


LEVR-KANTIC

AR-MISION




Evit misionou an Tadou eus Kompagnunez
ar Werc'hez Vari, ar Vontfortaned.

(S. M. M.)

Kanaouennou santel

ar Mision



gant a

Y. L. ROZEC. S. M. M.

NIHIL OBSTAT :

2-3-35

A. DUGUY, S. M. M.

Provinsial Bro-c'hall.

IMPRIMATUR :

25-10-33

Eug. LE BELLEC.

Vikel-bras Sant-Brieg.

EDI POTEST :

— 10 meurs 1935 —

H. HURÉ,

Rener-meur. S. M. M.

Pep gwir miret striz.

(Tous droits réservés)

TAOLENN

	Pajennou
Eur ger kinnig	9
Eveziadennoù	10
A	
Adoromp holl, hep ehan	89
Ael an Doue hor c'hrouas	27
An oferenn-mañ benniget	43
Ar Werc'hez souezet	55
Ave, Maris stella	89
B	
Bezit laouen, o Mamm Jezuz	28
C	
Credo Nise	94
K	
Kanomp uhel, kanomp c'hoaz	73
Kasomp holl hor bennoz	49
Klevit eur sekred souezus	61
Konsekrasion d'ar (Werc'hez Vari	103
D	
Da feiz hon Tadou-koz	69
Dalc'hit sonj mat	67
Den n'en deus komprenet	35
Deuit, Jezuz, gant ho korf	45

	Pajennou	
Dindan ar volz steredennet	78	
Diredit holl d'an taolennou	38	
Doue trugarezus	85	
Douget eo setans hor mankou	31	

E

En eur mor glac'har omp beuzet	94	
En ho kalon dreist karantezus	97	
Ennoc'h, Tad Montfort	76	
Evit maga hon ene	46	

G

Galvadennou santel	92	
Gwerc'hez glac'haret	36	
Gwerc'hez Vari ! Resevit	83	

H

Huanadi 'ran d'ar maro	32	
------------------------------	----	--

I

Itron Santez Anna	74	
-------------------------	----	--

J

Jezuz, e Breiz, dibabit beleien	87	
---------------------------------------	----	--

L

Laudate Dominum	90	
-----------------------	----	--

M

Magnificat	93	
Mari, kasit d'an dud difeiz	88	
Mari, Mamm a drugarez	59	
Memorare, Dalc'hit soñj	25	
Me 'zo kristen	72	

	Pajennou	
Misteriou ar Rozera		
Laouen	54	
Glac'harus	54	
Dudius	55	

N

Nag eun enor souezus !	60	
Nann, n'oun ket din	48	
Na plijus bras eo dont da bedi	93	
Ni ko salud, o Gwerc'hez glan	26	
Ni 'venn digoll an dismegans	52	

O

O Doue-Tad ! na bras eo	86	
O Kalon-Sakr, kalon Jezuz	51	
O Gwerc'hez glan, hep namm ebet	57	
O Mari ! ra vezo lavaret	63	
O nefvou, skuilhit ho klizenn	77	
O noz sioul !	79	
O Sakramant souezus	40	
O salutaris hostia	89	
O va Mamm, o va Jezuz !		
O Salver Jezuz ! O va Doue mat	37	

P

Pa vez digor ar bleunvennou	64	
Pardonit d'imp, Salver Jezuz	85	
Pedenn da Jezuz-Krist	105	
Pedenn d'hor Salver Jezuz-Krist		
Pedennou diouz ar mintin	11	
Pedennou diouz an noz	19	
Pedennou goude Bennoz ar Sakramant	91	
Petra 'zo degouezet	81	

R

Ra vo meulet e barr an neñv	80
Rouanez Arvor	65
Rouanez hor c'halon	82
Rozera (giz an Tad Montfort)	98

S

Spered-Santel, skuilhit ho sklerijenn	28
Soñjit en ho finvezioù	29
Soublomp hor penn d'ar gorreou	44

T

Tantum ergo	90
Te Deum	95

V

Va c'halon karget	63
Veni, Creator Spiritus	93

W

War ar groaz Hor Salver a dremene	42
---	----



EUR GER-KINNIG

«x»

An Aotrou Bellec, vikel-vras Sant-Brieg, goude beza lennet « Levr-Kantig ar Mision », a deurveze lavaret ar c'homzou-man d'e oberour :

« *Mon Père, vous avez réalisé là un tour de force. En supprimant l'hiatus (1) — ce que personne encore, à ma connaissance, n'avait osé —, en observant fidèlement la règle d'or (2), vous êtes parvenu à exprimer de hautes idées théologiques parfaitement ordonnées, dans un breton impeccable d'où vous avez chassé impitoyablement, avec les mots trop savants pour le peuple, les mots français et les gallicismes. Pour moi, c'est un véritable tour de force.* »


Ma 'z eo gwir mat ar c'homzou-ze, va c'hoant a zo deut da veza eun dra c'hraet.

Bennoz Doue d'an den enoret hag hegarat en deus bet ar vadelez d'o lavaret d'in ha da ginnig d'in e c'hourc'hemennou.

(1) - Hiatus. — H ha Y, e brezoneg, a dal evit kensonennoù ; H a vez distaget gant eur c'houezadennig verr. Rak-se e « beo ha yac'h bremañ » n'eus hiatus ebet.

(2) - « Reolenn aour », — Hervez ar « reolenn aour » an taol-mouez s dle beza atao war an hevelep sillabenn, er glotennoù : Da skouer : beñnoz, bemnoz. Met noz ne glota ket gant beñnoz.

EVEZIADENNOU



I. Ar c'hantigou a vezo skavet amañ a zo savet holl gant an oberour e-unan.

Komzou gallek an Tad Montfort o deus servijet d'ezan meur a wech. Met, evit lavaret mat, n'eus nemet ar c'hantig : « O Sakramant souezus », hag a ve troet ger evit ger pe dost.

Er c'hantigou all tennet diwar kantigou gallek pe brezonek, n'eo ket dalc'het na d'ar gerioù na zoken alies d'ar menozioù ha d'o renkadir.

II. Ar c'hantigou-mañ a zo savet evit Breiz a-bez. Rak-se ar brezoneg anezo eo ar brezoneg unvan.

Bep rann-vro a zistago ar gerioù hervez he c'hiz kustum.

Da skouer : Graet a vezo distaget great e Bro-Leon, h. a.

III. Re gustum oar da staga an eil ouz ebenn sillabennou hag, evit ober mat, a dle beza distaget. Da skouer : Po-an, ro-et, Dou-e, ta-ol (met e furm lies : poan-iou, taol-iou, h. a.).

Evit diskouez e rankont beza distaget an eil diouz eben ez eus savet eur varrenn (1) etre sillabennou a zo. Da skouer : po|an, ro|et, Dou|e, ta|ol.

PEDENNOU



PEDENN DIOUZ AR MINTIN

En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.

Evelse bezet graet (great).

Ton : 1) O Tad, Mab ha Spered-Santel
2) M'hoc'h ador, ma Doue.

1

EVIT ADORI DOUE

Me hoc'h ador, o va Doue ;
Me 'suj d'oc'h, o va Roue.
Evel Krouer ha Mestr ar bed
Me hoc'h anzav ha me ho ped.

2

EVIT TRUGAREKAT DOUE

Kas a ran d'oc'h trugarez,
Dre m'ho peus rojet d'in gwarez. (1)
En noz ho peus va diwallet,
Ha miret na ven bet gwallet.

3

EVIT GOULENN GRASOU

Jezuz, bennigit va devez
Evit ma vezin war evez,
War evez ouz ar fallentez
Ha douget holl d'ho karantez.

(1) - Proteksion.

4

EVIT KINNIG DIGOLL D'AR PEC'HEB

Kinnig a ran va menoziou,
Va c'hoazou ha' va labouriou,
Evit digoll kement pec'hed
Em eus gantan Doue rec'het (1).

5

EVIT PEDI MARI

O Mari, ken mat 'em c'heñver,
Grit ma sevenin va dever.
En ho kerz va zalc'hit a-bez,
En deiz-mañ ha betek ar bez.

6

EVIT PEDI AR SENT

Patroned ker ar Vretoned,
Hor pæroned ha maeroned,
Sant Jozeb hag holl sent an neñv,
Gant ho sikour ra vezimp kreñv.

7

EVIT PEDI AN AEL MAT

Allaz ! arvarus (2) eo hor stad !
A'el diwaller ; a'el mat,
Beilhit warnomp rak prins an droug
D'ar fallentez bepred hon doug.

(1) - Glac'haret.

(2) - Risklus.

HON TAD

Hon Tad hag a zo en neñv, hoc'h ano bezet santiflet ; ho rouantelez roit d'imp (d'eomp) ; ho polontez bezet graet (great) war an douar evel en neñv.

Roit d'imp (d'eomp) hirio hor bara pemdeziek ; pardonit d'imp (d'eomp) hon ofansou evel ma pardonomp d'ar re o deus hon ofañset ; n'hol lezit ket da goueza en tentasion met hon diwallit diouz an droug.

Evelse bezet graet (great).

ME HO SALUD

Me ho salud, Mari, leun a c'hras ; an Aotrou Doue a zo ganeoc'h ; benniget oc'h dreit an holl gwragez ha benniget eo ar frouez-eus ho korf Jezuz.

Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien, bremañ hag en eur eus hor maro.

Evelse bezet graet (great).

ME A GRED

Me a gred e Doue, an Tad Holl-C'halloudek, Krouer an neñv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab Unik, hon Aotrou ; an hini a zo bet konsevet dre vertuz ar Spered-Santel, ganet gant ar Werc'hez Vari, en deus gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet staget ouz ar groaz, lakaet (lakeat) d'ar maro ha sebeliet ; a zo diskennet en iferniou, en trede deiz savet eus a varo da veo ; a zo pignet en neñv, azezet en tu dehou da Zoue, an Tad Holl-C'halloudek, ac'hano e teuy da varn ar re veo hag ar re varo.

Me a gred er Spered-Santel, en Iliz santel, katolik, e kominion ar Sent, e remision ar pec'hejou, e resureksion ar c'hig, er vuhez peurbadus.

Evelse bezet graet (great).

ME. A. GOVEZ

Me a govez ouz Doue Holl-C'halloudek, ouz ar Werc'hez glorius Vari, ouz sant Mikael arc'hael (Mikeal arc'hél), ouz sant Yann-Vadezour, ouz an ebestel sant Per ha sant Paol, ouz an holl-sent (hag ouzoc'h-c'houi, va zad), abalamour m'am eus pec'hed bras dre soñj, dre gomz ha dre ober : dre va faot, dre va faot, dre va brasa faot.

Rak-se e pedan ar Werc'hez glorius Vari, sant Mikael arc'hael (Mikeal arc'hél), sant Yann-Vadezour, an ebestel sant Per ha sant Paol, an holl sent (ha c'houi, va zad), da bedi Doue evidoun.

Evelse bezet graet (great).

— Ra vezimp truezet gant Doue Holl-C'halloudek ha kaset gantan d'ar vuhez peurbadus, goude beza bet digantan ar pardon eus hor pec'hejou.

Evelse bezet graet (great).

— Ra zeuy d'imp (d'eomp) a-berz Doue Holl-C'halloudek ha trugarezus ar pardon, an absolvenn hag an dilez eus hor pec'hejou.

Evelse bezet graet (great).

—»«—

AR GOURC'HEMENNOU

GIZ LEON

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eun Doue ken a adori
Ha dreist pep tra holl a giri.
2. E vean e ano ne douji ket,
Nag ive netra all ebet.
3. Ar suliou santel a viri,
E servij Doue; ouz E veuli.

4. Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Diwall na lazi den ebet,
Nag a zezir, nag a efed.
6. Lubrik ne vezi ket ivez,
Nag a gorf, nag a volontez.
7. Laerez na miret madou den,
E gouiziegez ne ri biken.
8. A enep den fals-testeni
Na gaou ebet ne liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e soñj vil n'en em lezi.
10. Na souhet madou da hentez
Evit o c'haout dre fallentez.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

1. Ar goueliou-berz a santifi,
Neuze pep labour a lezi.
2. Ha kleo devot a-benn-da-benn,
Sul ha gouel-berz, an oferenn.
3. Eur wech er bloaz, da vihana,
E kovesay hep nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi,
Da bask, devota ma c'helli.
5. Yun a ri d'an daouzek deizioù,
D'ar c'horaz ha d'ar vijilou.
6. Kig, nemet da zeiz Nedeleg
Gwener na vijil, ne zebri ket.

GIZ KERNE

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eun doue ken a adori,
Ha dreist pep tra holl a gari.
2. Hep kaoz, e ano ne doüi ket,
Nag ive netra all ebet.
3. Miret a ri an holl suliou,
Gant evron mat ha pedennou.
4. Da dad, da vamm a enori,
Ha da vuhez a astenni.
5. Ha mir ne lazi den ebet,
Nag a galon nag a efed.
6. Lubrik mir na vezi nepred,
Dindan boan da veza daonet.
7. En em ziwall diouz laeronsi ;
Na dommaj d'az hentez na ri.
8. Na gevier, na fals-esteni
Mir birviken na liviri.
9. Madou re all na zezir ket,
Evit o c'haout hep gwir ebet.
10. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e soñj vil n'en em bliji.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

1. Klejo devot a-benn-da-benn,
Bep sul, bep gouel, an ofereñn.
2. Neuze pep labour a lezi,
Evit da Salver enori.
3. Kovez a ri, da vihana,
Eur wech ar bloaz, bep nac'h netra.

4. Ha da Bask e sakramanti,
Rak se e stad-vat e vevi.
5. Yun a ri d'an daouzek deiziou,
D'ar c'houraiz hag d'ar vijilou.
6. En deiz vijil, na da wener
Ne zebri kig e nep amzer.

LITANIOU JEZUZ

Kyrie, eleison.	Jesu obedientissime,
Christe, eleison.	Jesu mitis et humilis corde,
Kyrie, eleison.	Jesu amator noster,
Jesu, audi nos.	Jesu Deus pacis,
Jesu, exaudi nos.	Jesu auctor vitæ,
Pater de cælis, Deus, mise-	Jesu exemplar virtutum,
rere nobis.	Jesu zelator animarum,
Fili redemptor mundi, Deus,	Jesu Deus noster,
miserere nobis.	Jesu refugium nostrum,
Spiritus-Sancte, Deus,	Jesu pater pauperum,
Sancta Trinitas, unus Deus,	Jesu thesaurus fidelium,
Jesu Fili Dei vivi,	Jesu bone pastor,
Jesu splendor Patris,	Jesu lux vera,
Jesu candor lucis æternæ,	Jesu sapientia æterna,
Jesu rex gloriæ,	Jesu bonitas infinita,
Jesu sol justitiæ,	Jesu via et vita nostra,
Jesu fili Mariæ virginis,	Jesu gaudium angelorum,
Jesu amabilis,	Jesu rex patriarcharum,
Jesu admirabilis,	Jesu magister apostolorum,
Jesu Deus fortis,	Jesu doctor evangelistarum,
Jesu Pater futuri sæculi,	Jesu fortitudo martyrum,
Jesu magni consilii angele,	Jesu lumen confessorum,
Jesu potentissime,	Jesu puritas virginum,
Jesu patientissime,	

Jesu corona sanctorum omnium, miserere nobis.
 Propitius esto, parce nobis, Jesu.
 Propitius esto, exaudi nos, Jesu.
 Ab omni malo, libera nos, Jesu.
 Ab omni peccato, libera nos, Jesu.
 Ab ira tuâ,
 Ab insidiis diaboli,
 A spiritu fornicationis,
 A neglectu inspirationum tuarum,
 A morte perpetuâ,
 Per mysterium sanctæ incarnationis tuæ,
 Per nativitatem tuam,
 Per infantiam tuam,
 Per divinissimam vitam tuam,
 Per labores tuos,
 Per dolores tuos,
 Per agoniam et passionem tuam,
 Per crucem et derelictionem tuam,
 Per linguas tuas,
 Per mortem et sepulturam tuam,
 Per resurrectionem tuam,
 Per ascensionem tuam,

Per sanctissimæ Eucharistiæ institutionem tuam,
 Per gloriam tuam, libera nos, Jesu.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Jesu.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Jesu.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis, Jesu.
 Jesu, audi nos.
 Jesu, exaudi nos.
 V. Sit nomen Domini benedictum.
 R. Ex hæc nunc et usque in sæculum.

OREMUS

Domine Jesu Christe, qui dixisti : petite et accipietis, quaerite et invenietis, pulsate et aperietur vobis, quaesumus, da nobis petentibus divinissimi tui amoris, affectum, ut te toto corde, ore et opere diligamus, et à tuâ numquam laude cessemus. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

PEDENN DIOUZ AN NOZ

En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.

Evelse bezet graet (great).

- Ton : 1) Konsakri a ran va nozvez.
- 2) M'ho trugareka, ma Aotrou.

Pedenn da Zoue an Tad

1. En ho tourn, o Doue hon Tad.
 Ec'h en em lezomp a c'hrad-vat.
 Rak ho Mab en deus hor prenet,
 Hag eus ar peched hon tennet.
2. Argasit ar gwall-hunvre ou ;
 Hon diwallit ouz gwidre ou,
 Ouz gwidre ou hon enebour ;
 Hep ehan d'hor c'holl e labour.
3. N'hon dilezit ket eur begad,
 Evel ma vemp mab-ho-lagad.
 Dindan askell ledan ho nerz
 Hor mirit diouz pep drouk-berz.

Pedenn da Jezuz

4. Hag e vemp dilun pe kousket.
 Ra vimp, Jezuz, en ho kwaked.
 Neuze gaue oc'h e veillimp,
 Hag en ho sell e tiskuilzimp.

Pedenn d'ar Spered-Santel

5. Hon enebour a zo war spi ;
 Spered-Glan, chemit en hon ti.
 Satan neuze ne ray ket freuz
 Hag ennemp ne vo ket a reuz.

Pedenn da Vari

6. O Mari, Mamm an holl grasou,
Mammenn an holl madelezou,
Flasrit e benn d'an Drouk-Spered.
Ma vezimp ouz e flemm miret.

*Pedenn d'an Aelez
ha d'ar Sent*

7. Bezit c'ho|az ar vadelez
Da zegas d'imp hoc'h a|elez.
Digant ar sent e c'houlennomp
Dere'hel Doule bepred ennomp.

PATER

Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur nomen tuum ;
adveniat regnum tuum ; fiat voluntas tua sicut in cœlo et in
terrâ.

Panem nostrum quotidianum da nobis hodie et dimitte
nobis debita nostra, sicut et nos dimittimus debitoribus nos-
tris ; et ne nos inducas in tentationem, sed libera nos a malo.
Amen.

AVE

Ave, Maria, gratiâ plena, Dominus tecum ; benedicta tu
in mulieribus et benedictus fructus ventris tui, Jesus.

Sancta Maria, mater Dei, ora pro nobis peccatoribus, nunc
et in horâ mortis nostræ.

Amen.

CREDO

Credo in Deum Patrem omnipotentem, creatorem cœli et
terræ, et in Jesum Christum, Filium ejus unicum, Dominum

nostrum, qui conceptus est de spiritu Sancto, natus ex Mariâ
virgine passus sub Pontio Pilato, crucifixus, mortuus et sepul-
tus ; descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mortuis,
ascendit ad cœlos ; sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis,
inde venturus est judicare vivos et mortuos.

Credo in Spiritum Sanctum, sanctam Ecclesiam catholi-
cam, Sanctorum communionem, remissionem peccatorum, car-
nis resurrectionem, vitam æternam. Amen.

Graomp eur sell war hor goustians. (Eun ehan).

CONFITEOR

Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper virgini,
beato Michaeli archangelo, beato Joanni Baptistæ, sanctis apos-
tolis Petro et Paulo, omnibus Sanctis (et tibi, Pater), quia
peccavi nimis cogitatione, verbo et opere ; meâ culpâ, meâ
culpâ, meâ maximâ culpâ.

Ideo precor beatam Mariam semper virginem, beatum Mi-
chaelem archangelum, beatum Joannem Baptistam, sanctos
apostolos Petrum et Paulum, omnes Sanctos, (et te, Pater),
orare pro me ad Dominum Deum nostrum. Amen.

Miseratur nostri omnipotens Deus et, demissis peccatis
nostri, perducat nos ad vitam æternam. Amen.

Indulgentiam, absolutionem et remissionem peccatorum
nostrorum tribuat nobis omnipotens et misericors Dominus.

Amen.

GOURCHEMENNOU DOUE

HA GOURCHEMENNOU AN ILIZ. (p. 14--17).

LITANIOU AR WERC'HEZ

Evit gouleñ an holl grasou hon eus ezomm anezo, lavaromp gant
vez litaniou ar Werc'hez Vari.

Kyrie, eleison.
 Christe, eleison.
 Kyrie, eleison.
 Christe, audi nos.
 Christe, exaudi nos.
 Pater de cœlis, Deus, misere
 nobis.
 Fili redemptor mundi, Deus,
 miserere nobis.
 Spiritus-Sancte, Deus, mise-
 rere nobis.
 Sancta Trinitas, unus Deus,
 Sancta Maria, ora pro nobis.
 Sancta Dei Genitrix,
 Sancta Virgo virginum,
 Mater Christi,
 Mater divinæ gratiæ,
 Mater purissima,
 Mater castissima,
 Mater inviolata,
 Mater intemerata,
 Mater amabilis,
 Mater admirabilis,
 Mater boni consilii,
 Mater Creatoris,
 Mater Salvatoris,
 Virgo prudentissima,
 Virgo veneranda,
 Virgo prædicanda,
 Virgo potens,
 Virgo clemens,

Virgo fidelis,
 Speculum justitiæ,
 Sedes sapientiæ,
 Causa nostræ lætitiæ,
 Vas spirituale,
 Vas honorabile,
 Vas insigne devotionis,
 Rosa mystica,
 Turris Davidica,
 Turris eburnea,
 Domus aurea,
 Fœderis arca,
 Janua cœli,
 Stella matutina,
 Salus infirmorum,
 Refugium peccatorum,
 Consolatrix afflictorum,
 Auxilium christianorum,
 Regina angelorum,
 Regina patriarcharum,
 Regina prophetarum,
 Regina apostolorum,
 Regina martyrum,
 Regina confessorum,
 Regina virginum,
 Regina sanctorum omnium,
 Regina sine labe originali
 concepta,
 Regina sacratissimi Rosarii,
 Regina pacis, ora pro nobis.
 Agnus Dei, qui tollis peccata

mundi, parce nobis, Do-
 mine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata
 mundi, exaudi nos, Do-
 mine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata
 mundi, miserere nobis.

Sub tuum præsidium con-
 fugimus, sancta Dei Geni-
 trix ; nostras deprecationes
 ne despicias in necessitati-
 bus, sed a periculis cunctis
 libera nos semper, Virgo glo-
 riosa et benedicta.

V. Ora pro nobis, sancta
Dei Genitrix.

R. Ut digni efficiamur pro-
promissionibus Christi.

OREMUS

Defende, quæsumus, Do-
 mine, beatâ Mariâ semper
 virgine intercedente, istam
 ab omni adversitate familiam
 et toto corde tibi prostra-
 tam, ab hostium propitiis
 tuere clementer insidiis. Per
 Christum Dominum nostrum.
 Amen.

EVIT HON ANAON KARET

- De profundis clamavi ad te, Domine ; Domine, exaudi vocem meam.
Fiant aures tuæ intendentes, in vocem deprecationis meæ.
- Si iniquitates observaveris, Domine ; Domine, quis sustinebit ?
Qui apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.
- Substituit anima mea in verbo ejus ; speravit anima mea in Domino.
A custodiâ matutinâ usque ad noctem, speret Israël in Domino.
- Quia apud Dominum misericordiâ, et copiosa apud eum: redemptio.
Et ipse redimet Israël ex omnibus iniquitatibus ejus.
- Requiem æternam dona eis, Domine, — et lux perpetua luceat eis.
Requiescant in pace. Amen.

OREMUS

Fidelium, Deus, omnium Conditor et Redemptor, animabus
 famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tri-

due peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt piis supplicationibus consequantur. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

EVIT BREURIEZ AR FEIZ HAG HOLL EZOMMOU AN ILIZ

Pater, Ave.

AN AKTOU

AKT A FEIZ

Va Doue, me a gred start an holl gwirioneziou ho peus roet da anaout hag a c'houlenn an Iliz diganimp (diganeomp) kredi, abalamour ma 'z oc'h ar wirionez hez-unan ha ma ne c'hellit nag en em fazia nag hol lakât da fazia.

AKT A ESPERANS

Va Doue, me a c'hed gant fizians a-berz ho madelez ha dre meritou Jezuz-Krist, va Salver, ho krasou er bed-mañ hag ar baradoz er bed all, abalamour m'ho peus o frometet d'in ha ma talc'hit atao d'ho ker.

AKT A GARANTEZ

Va Doue, me ho kar a greiz va c'halon dreist kement tra a zo, abalamour ma 'z oc'h infinimant mat hag infinimant din da veza karet. Ha karout a ran an nesa evel doun va-unan dre garantez evidoc'h.

AKT A WIR-KEUZ

Va Doue, keuz bras em eus d'ho peza ofañset abalamour ma 'z oc'h infinimant mat hag infinimant din da veza karet hag abalamour ma tisplij d'eoc'h ar peç'hed. Pardonit d'in dre meritou Jezuz-Krist. Prometi a ran d'eoc'h a greiz va c'halon n'hoc'h ofañsin mui gant sikour ho kras, hag e rin pinienn.

—»«—

MEMORARE

Dalc'hit soñj, ô Mari, Gwerc'hez holl douget da Zoue, n'eo bet klevet a-viskoaz ho pefe dilezet unan bennak eus ar re a zo en em lakaet dindan ho peli, eus ar re o deus goulennet ho skoazell ha sikour ho pedennou.

Harpet war an hevelep fizians, dont a ran d'ho kaout, Gwerc'hez ar gwerc'hezed. Davedoc'h e teuan ha pec'her gla-c'haret dirazoc'h e stouan.

Na zisprizit ket va c'homzou, Mamm Komz-Doue, met teurvezit o selaou ha rei d'in va goulenn.

—»«—

ANGELUS

Angelus Domini nuntiavit Mariæ.

— Et concepit de Spiritu Sancto.

Ave, Maria.

Ecce ancilla Domini.

— Fiat mihi secundum verbum tuum.

Ave, Maria.

Et verbum caro factum est.

— Et habitavit in nobis.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.


— Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS

Gratiam tuam, quesumus, Domine, mentibus nostris infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eumden Christum, Dominum nostrum. Amen.

Gloria Patri. (teir gwech).

Divinum auxilium maneat semper nobiscum ! Amen.



DA GANA GANT AN ANGELUS

Ton : Ni ho salud, gant karan

tez.

1

Gwerc'hez

Ni ho salud, o Gwerc'hez glan,
Mari, sikour ar e'hristen gwan.

Bisko|az mastaret, (1)

O pia !

Dreist an holl oc'h karet.

Ave, Maria.

2

Mamm Doue

Ni ho salud, Mamm evurus,
Gwir Vamm Dou|e, Mamm
[da Jezuz.

Ni 'gan holl, gant dudi,

O pia !

D'ho ta|ou meuleudi.

Ave, Maria.

3

Mamm ar gristenien

Ni ho salud, o Mamm an dud,

Hon harpit bremañ, er bed
[yud.

Hag ouz an tan garo

O pia !

Hor mirit d'ar maro

Ave, Maria.

(1) Kailharet.

AN ANGELUS E BREZONEG

Ton : Eun arc'hél, a-berz an Aotrou.

1

A|el an Dou|e hor c'hrouas } (bis)
Dirak ar Werc'hez a stouas }

« Ar Spered-Glan ho kempenno,
« Ar Mab ennoc'h a ziskenno. » (bis).

2

— « Setu servijerez Dou|e
« Hag a venn su|a d'he Rou|e. » (bis).

— « Ra vo gra|et hervez ho ker.

« Ar burzud ennouñ, kannad ker ! » (bis).

3

Gant eur c'horf e Mari furmet
Jezuz e den 'zo bet stummet. (bis).

— Ha Mab-Dou|e, nag eur sou|ez !

En deus bevet en hon tou|ez. (bis).

4

Evidomp, Mamm santel Jezuz,
Kasit eur bedenn tru|ezus. (bis).

— Ma c'hounezimp an holl grasou

Prometet d'imp-gant hon Aotrou. (bis).

REGINA COELI LOETARE

Ton : En em gonsolit evit mat.

1

Tridit en eur mor a zudi,
Rou|anez ker an neñvou.
Ehanit gant an hirvoudi,

Dilezit krenn ho leñvou.
Da Jezuz kanomp meuleudi.
Echu bremañ ar c'hañvou.

DISKAN

Bezit laouen, o Mamm Jezuz,
 Setu ho Mab adkavet.
 Klevit an darvoud sou|ezus :
 Eus ar bez ez eo savet.
 Alleluia ! Kel evurus !
 Jezuz en deus hor salvet.

2

An hini ho peus meritet
 Dougen ennoc'h, Mamm garet,
 A zo bremañ resusitet
 Hervez m'en doa lavaret.
 Evidomp d'ejoc'h teurvezet
 Pedi, Mamm diglac'haret.

3

Fuilhet ho peus levenez bras
 O Doue, war an dou|ar.
 Jezuz, ho Mab ha Mestr ar c'hras,
 A zo beo ha yac'h bremañ.
 Dre Vamm Jezuz, rojit d'imp plas
 Er baradoz, gant Hemañ.

— «x» —

AROK AR BREZEGENN

Ton : Spered-Santel, Spered a Sklerijenn.

1

Spered-Santel, skuilhit ho sklerijenn,
 War hor spered leun a defivalijenn.
 Ra lugerno hep ehan ho sklerder
 Hag, en hent mat, e kerzimp gant herrder.

2

O Spered-Glan, kargit hor c'halonou
 A garantez hag a zônezonou.
 Hon entanit, ni bremañ ken klou|ar,
 Hag e vezo cheñchet dremm d'an dou|ar.

3

Gwerc'hez Vari, pried ar Spered-Glan,
 A ziskennas ennoc'h e furm an tan,
 Mirit ennomp karantez ha gwir feiz,
 Evit, d'an neñv, mont d'ho kwelet, eun deiz.

— «x» —

AR SILVIDIGEZ

— «x» —

AR FINVEZIOU DIWEZA

Ton : 1) Ar Re Unanet : Diskennomp holl, kristenien.
 2) Ar Chouanted : A-benn nebeut bloaveziou.

1

Sonj ar finveziou diweza

Soñjit en ho finveziou ha ne bec'hot ket ken.
 Ar Spered-Glan hel lavar, er Skritur, da bep den.
 Ne 'z eus ket suroc'h kentel evidomp da chom kreñv,
 Ha, goude beza trec'het, da c'hounit prof an neñv.

2

Ar maro

D'ar poent merket gant Doue, e rankimp holl mervel.
 Met ne c'houzomp ket an-deiz ma teujio d'hor gervel.
 Bemdez bezomp prest eta ha sonjomp er maro.
 Ar maro, pa vez gedet, ne vez ket ken garo.

3

Ar varn genta

Met an ene|ou goude, Doue holl o barno.
 Eur sklerijenn digoumoul a lugerno warno.

Hervez e virit neuze, pep den a resevo ;
Ha dijabarz e galon, ar setans a glevo.

4

Ar servijerien fejal, hag o devo stourmet,
A yelo d'ar baradoz, e stad skedus stummet.
D'ar servijer lezirek, gwastet holl e vuhez,
Ar setans a vo douget a vezo didruej.

5

Ar purkator

Evit mont d'ar baradoz, dreist m'eo ret beza gwenn,
Ar galon a rank beza diboultrenn penn-da-benn.
E tan-gwall ar purkator, pell dijouz an neñvou,
E ranker en em wennât, dre bol an ha leñvou.

6

Ar varn ziweza

Pa deuiio fin an amzer e vo barnet c'hojaz.
Hor Salver a ziskenno, skedus, gant e grojaz.
Hag e traonien Jozaphat e vo bodet an dud.
Dirak Jezuz e chomint mantret, siñoul ha mut.

7

An dud e dijou vandenn a vo neuze rannet ;
Hag e vo, gant ar Barner, ar setañs embannet.
An dud salvet, a-zehou, Jezuz o vennigo,
Met, a-gleiz, an dud daonet, er spont, e villigo.

8

An ifern

O ! nag eur gwall-eur spontus : en ifern koujeza !
Nann ! ne c'hell ket, end-e-leun, brasoc'h gwall-eur beza.
En ifern, an dud daonet a c'houzanv e vejan,
Pell dijouz dremm o Doue ha devet hep ehan.

9

Gouzañv ouspenn a ranker hep gortoz fin ebet.
Bepred an tan a bado hag a zevo bepred.
An disesper a grigno hep ma c'hallfer mervel.
Biken Doue ne deulio d'an neñvou d'o gervel.

10

Ar baradoz

O ! na mat eo Hor Salver da veza hon tennet,
Eus etre skilfoù Satan ha beza kempennet
Eur baradoz dudius, ennam an holl madou !
Bez' e vezo gounezet, dre nerz ar stourmadou.

AR MARO

«X»

RET EO MERVEL

Ton : Petra 'zo nevez e kêr Is.
Pa zaoulinomp evit kovez.

3

Dilezel a rankimp hor brud,
Hor c'harg, hor mignoned, hon tud
Ganimp ne deulio den eta,
Zoken hor c'herent kareta.

1

Douget eo setañs hor mankou :
Allas ! barnet omp d'an Ankou.
Holl e rankimp eur wech mervel,
Pa deuiio Doue d'hor gervel,

2

Ret e vo neuze dilezel,
Hep ma vo tamm gillet herzel,
Hor madou dastumet ken piz
Ha bet dalc'het d'ezo ken striz.

4

Ar c'horf d'an ene lijammet
A vezo neuze diframmet.
An den ne chomo ket a-bez...
Ar c'horf a ranko mont er bez.

5

Kalz preder a vez kemeret
Gant ar c'horf war goust ar spered.
Holl heñvel ar c'horfou gweñvet
A vezo boujed ar preñved.

6

Eun dra dilarvar eo c'hojaz
E vo re ziwezat chojaz.
Pa vo tremenet ar maro,
Ne cheñcho ket 'neb a garo.

7

Rak an huanad diweza,
Evidomp holl, a rank beza
An tremen eus buhez ar bed
D'an hini n'he deus fin ebet.

8

Eus an termen ne c'houzomp ket,
Nag a-bell nag a-dost, ar pred.
Epad an deiz ? Epad an noz ?
Ez yaouank pe pa vezimp koz ?

13

« Ma vezit d'ar Werc'hez devot
Hep mar, an neñv a resevot. »
Setu kentel karet ar sent.
N'eus ket, end-ejeun, suroc'h hent.

»«

KENTELIOU AR MARO

Ton : Petra 'zo nevez e kêr Is.
Pa zaoulinomp evit kovez.

1

Huanadi 'ran d'ar maro
Evel d'an dou-red ar c'haro.

Ra yelo va c'horf d'ar vered,
Evit diluja va spered.

9

Ar pezh a gresk c'hojaz hon nec'h,
Ne c'houzomp ket muioc'h al lec'h.
En hon ti pe pell ouz ar gêr ?
Hon-unan pe gant hon tud ker ?

10

Ha penaos ? Ne c'houzomp ket.
Na pet kleñved e-barz ar bed !
Nag a wall-êur en hon toujez !...
An dud koz bremañ 'zo roujez !...

11

Bezomp holl neuze war evez,
Rak Jezuz en deus, en devez,
Diskleriet sklaler ar menoz.
E teujio davedomp fenoz.

12

Ne c'houzout ket, brasa pojan !
Hag e po dudi pe dojan...
Servij gant karantez Mari...
Hag ar baradoz a gavi.

2

Soñjal er finvez diweza,
War soñj ar maro poujeza
A zo da bep den talvoudus
Ha d'e gentelia galloudus.

3

Ar soñj-mañ a ro sklerijenn
Dre ma teuz an deñvalijenn
A guz d'an den e blanedenn
Ha dre ma kreñva d'e gredenn.

4

Ar maro 'zo priz ar pec'hed,
Rak kollet eo bet ar yec'hed
Er baradoz dre zizenti...
E lec'h eurvad, merzerenti.

5

Ne vimp ket da viken er bed.
Bezomp bemdez neuze war ged
Bezomp evel tremenidi
Prest bepred da gimijadi.

6

War an doujar ar re greñva
Alijes gwech a rank leñva.
Ar maro 'ro d'imp ar menoz
Eus an diskuiz, eus ar bennoz.

7

Soñj ar maro d'ar volontez
A zegas brasoc'h karantez,
Evit kerzout war roud ar sent,
Bujanoc'h c'hojaz eget kent.

8

O taoulina war ar beziou,
O soñjal en o finveziou,
E vez ouz an droug distaget
An dud a zo gantan taget.

9

Hag e ve kavet soujezus :
Ar maro 'zo karantezus.
Rak ma tegas gantan kañvou
E ro dor digor d'an neñvou.

10

Ar maro resevet a c'hrad
A zo gant gwir eur gounid mat,
Gounid kurunenn an dudi,
Gounid eur brasoc'h meuleudi.

11

En desped d'e bojan garo,
Mousc'hoarzomp eta d'ar maro.
Sellomp ouz dremm laouen
hor Mamm
Hor sikouro d'ober hol lamm.

»«

AR PURKATOR

Ton : Allas ! ne c'houfe den kompren.

1

En eur mor glac'har omp beuzet ;
Gant koñtell ar bojan treuzet.

Ar Purkator a zo flemmus ;
O ! klevit hor moujez klemmus !

Diskan

Kerent ! c'houi ho poa lavaret
E vefemp da viken karet.
Trujez ! Ni 'zo holl glac'haret !

2

Gant an droug ez'omp bet trec'het
Koujezet omp bet er pe'hed.
Bez 'eo gant Jezuz absolvez,
Met n'hon eus ket hen digollet.

3

Gant pinijenn en hor buhez,
Hon defe gounezet trujez.
Amañ, gant Doue kastizet,
Ez omp gant an holl dilezet.

4

Amañ pell dijouz an neñvou,
Ne deu ganimp nemet leñvou ;
D'ar baradoz ec'h hirvoudomp,
D'ar Werc'hez ec'h huanadomp.

5

Gant ar bolan ez omp brevet,
Hag, en tan, hep ehan devet.
Klaskit bujan e zigreski,
N'hol lezit ket pell da leski !

10

Oberou-mat rojit c'hojaz
Hag e skañvot d'hor c'hrojaz.
Holl dud karet eus hor buhez
En an' Doue ! Trujez ! Trujez !

6

O ! nag an amzer a zo hir !
Sanket ennomp evel eur bir,
An hirnez bepred hon glojaz.
Eun devez a dal d'imp blojaz !

7

Hor c'hlemmou den muji ne gleo.
Dilezet omp gant an dud beo.
Goulskoude nag a bromesa.
A-berz hor c'herent, an nesa !

8

Ne sonjit ket ken e madou
Ho mammou ker hag ho tadou !
Ne soñjez ket out bet kajoz
M'am eus kerzet en hent fajoz !

9

En an' Doue ! Grit pinijenn !
Gounezit d'imp ar sklerijenn.
Evidomp kasit pedennou ;
Lavarit kalz oferennoù.

AR BARADOZ

Ton anavezet : Jezuz, peger bras e.

Diskan

Den n'en deus komprenet
Ar blijadur prenet
D'an dud karantezus
En neñvou, gant Jezuz (bis).

1. Kement mad war eun dro
Er baradoz a vo.
An neñv pep mad a zoug,
Hep an distera droug.

2. Hor Salver en neñvou
A sec'ho hel leñvou.
Ne vo nemet dudi,
Kaniri, meuleudi.

3. Ar baradoz, hor bro
An diskuiz leun a ro.
Ar c'horf 'vo hep polan,
An ene hep dojan.

4. Ajet dreist ar stered,
Dre lagad ar spered,
E welimp, er splannet,
Tri Ferson an Dreinded.

5. Ar spered a welo
Dirazan dizolo
Trajou kuzet ar bed
A ne gomprens ket.

6. Kaler e vo gwelset
Spered an ajeled
Plijadur a vezo
Klevout o c'han d'ezo.

7. Nag eun dudi hep par
Evit an den a gar
Karout kement ma c'hell,
Beza karetoc'h pell.

8. Eus ar bez pa savo
Ar c'horf a resevo
E lod eus an eurvad
A ren en neñv ervat.

9. Bremañ en douar kriz
E c'houzañv a bep giz
Neuze 'vo diglañvus
Ha 'krenn dic'houzañvus.

10. Hag e vezo sklaer
Hag e vezo kaler
Gant gwir-dreist an tañver
Gant gwir-dreist ar skañver.

11. Pegen plijadurus
Gwelout korf evurus,
Korf Jezuz 'Hor Salver,
Brava den a gavfer.

12. Na plijus bras e vo
Beza bepred war dro,
War dro Mari, hor Mamm,
En he gened ken flamm.

13. D'an neñv ni 'dremeno
Hag e kavimp eno
Hon tud, hor mignoned
Ar Sent, hor patroned.

14. Na lirzin 'vo kerzout
En neñvou ha merzout
°Ar bed nevez kroulet
Hep ma vemp inoulet.

15. Etoulez ar c'hañvou
E sonjin en neñvou
Hag e tougin va samm,
Kennerzet gant va mamm.

16. Gant alon ouz ar fall
E c'houlennan gant mall
Mont kuit eus ar bed-mañ
Mont d'an neñvou bremañ.

17. Rojit d'imp, o Jezuz
Mari; Mamm truezus,
Roit d'imp holl ar c'hras.
Da c'hounit sur hor plas.

«x»

GWIR - KEUZ AR PEC'HER

Ton : Doue, gwir bried.

Diskan

Gwerc'hez glac'haret,
Karantezus,
N'hon eus ket karet,
Ni ken mastaret, (1)
N'hon eus ket karet
Ho Mab Jezuz.

1. Bras eo hor pec'het,
Enep Doue.
Bez' hon eus nac'het
Gant Satan trec'het,
Bez' hon eus nac'het
Hor gwir Roue.

2. Torfed sebezus !
O Doue mat :
Nag eun dra mezus
Digarantezus,
Nag eun dra mezus :
Trei kein d'eun Tad !

(1) Kailharet.

3. Pec'her di-geuzet,
Sell ouz Jezuz.
E gorf 'zo freuzet
E dreid 'zo kleuzet,
E gorf 'zo freuzet.
Den trujezus !

4. Jezuz, er grolaz
Dre hon techou
A c'houzañv c'hojaz
Pojan dreist-bojaz,
A c'houzañv c'hojaz
Kalz rebechou.

7. Keuz hon eus kenañ,
Bez 'omp mezus.
Ne bec'himp bremañ
Biken er bed-mañ.
Ne bec'himp bremañ
Enep Jezuz.

5. Ouzin eo kaset
Ar Spered-Glan,
Ouzin argaset
D'ezan pourchaset.
Ouzin argaset,
Ha ne ran van !

6. Ni 'wel holl euzet
Mamm, ho tojan.
Ho kalon treuzet,
En anken beuzet.
Ho kalon treuzet,
Gant ar bojan.

»o«

HUANADOU AR PEC'HER

Ton : Sant Josef, Pried Mari.

Diskan

O va Mamm, o va Jezuz,
Na pounner eo va samm !
Ra vezot trugarezus,
Va gwalc'hit eus pep namm !

1. Argaset ar gasoni
Kuzet ennoun c'hojaz
Hag ouz pep seurt loustoni
Ya mirit dinojaz.

2. Er bed-mañ n'oañ ket ganet
Pa 'm eus gralet an droug.
Aba n'oun ket ehanet
D'hen santout war va choung.

3. Warnoun evit va gwenna
Skuilhit ho kwad muz-tan.
Hag evel an erc'h gwenna
Jezuz, e vezin glan.

4. Na sellit ken, va Jezuz,
Ouz va holl feñhejou.
Va gwelit kentoc'h mézus
Gant va gwall torfejou.

5. O Spered, Doule glanded,
N'am argasit ket pell.
Met e audi ho splanded
Va dalc'hit en ho sell.

6. Ha d'an holl e tiskuilhin
Laouen ho madelez.
War ar pec'her e fuilhin
Komzou ho kuñvez.

7. O Mamm, n'eus ket bet klevet
Ho pefe dilezet
Kalon ho pugel brevet
Hep beza pourvezet.

AN TAOLENNOU

Ton anavezet : Sellit piz ouz an taolennou.

1

Diredit holl d'an taolennou,
Pouezusa prezegennou.
Hag a strink sklerijenn ken fiamm (bis)
O rei da bep unan e damm.

2

Karit bepred ho taolennou,
Skeudenn garet ho kredennou ;
Gwir mellezour an eneoù,
Gant o vertuz, o gwidreioù.

3

Er mellezour-mañ, pep hini
A wel ar stad emañ enni :
Stad ar pec'hed pe stad ar c'hras,
Stad an dam-keuz, stad ar c'heuz bras.

4

Sellit, kristenien, sellit piz
Ouz an hent ledan, an hent striz.
N'eus nemeto war an douar,
Hent an dud vat, hent tud klouar.

5

Allas ! Ieñvomp ha Ieñvomp puilh
War ar pec'her er fank o ruilh.
Gant mestr an ifern eo renet.
D'an tan e-riskl beza treinet.

6

Eleiz a dud a ya da goll,
Da heul an hudurniez dreist-holl.
Na pet, e salioù milliget,
D'ar pec'hed vil a vez douget.

7

Warlerc'h pec'hed ar vezventi,
E vez kavet merzerenti.
Eur mezhvier a gas, hep dalc,
Da doull ar bez, e vugale.

8

Dilezit bremañ ho techou.
— Doule ne c'hed ket awechou —
Mibien foran Doule ho Tad.
Distro'it holl war an hent mat.

9

Dalc'hit goude ha dalc'hit start,
War an hent mat, gant ho kerz sart.
Rak ar c'hlañavour adkouezet
Ne vez ket bu'an pare'et.

10

Jezuz, Mari bezit truez.
Hor sikourit hed hor buhez,
Evit ma savimp gant an hent
A gas eññ davet ar sent.

SAKRAMANT an AOTER

«X»

O SAKRAMANT SOUEZUS

Ton : O l'auguste Sacrement.

Disk anou

1

O Sakramant sou|ezus
E tebromp ennan Jezuz.
Kuzet dindan ar spesou,
Hen kredan war e gonzou.

2

Meulomp holl Jezuz
En e sakramant sou|ezus. } (bis)
(Araok komunia)
Da gomuni|a
Hor c'hempennit, o Mari|a. } (bis).

1

D'ar veleien e lavar
Derc'hent sevel d'ar c'halvar :
« D'ho tro kinniguit d'am zad
« Va c'horf amañ ha va gwad. »

2

War an aoter ar beleg
A ra burzud Nedeleg.
Rak, eus an neñv p'hen galver,
Pep gwech e teu Hor Salver.

3

Bez' emañ en neñv a-bez
Holl en armel-sakr e vez.
Douget gant e garantez,
Ganimp e venn chom bemdez.

4

N'eus ken na gwin na bara.
Dirak ar sell o para.
Ne chom ken nemet spesou
O kuz korf, gwad hon Aotrou.

5

Da wel n'eus cheñchet netra,
Nag er gwin nag er bara.
Jezuz a gemer o flas,
Daoust ma chom o furm, o blaz.

6

Na glaskomp ket re gouzout
Eur burzud dreist hor galfoud.
Skiññt-den a zo dister....
Kredomp dinec'h ar mister.

7

Er sakramant eo serret
Evel ma kuz eur spered.
E pep lec'h eus an osti
Emañ holl hep disparti.

8

A-bez e vez resevet
Pa vez debret hag evet.
A-bez gant e natur-den,
Nann egiz Douje hepken.

9

An neñv hen reseo divat
A c'hounit e varn ervat.
Hennez eo torfed an dud
A heuilh pok Judas ar yud.

10

Ma kempennet mat da di
Hep mar evurus e vi.
Teuzet 'vo da volontez
Gant Jezuz, er garantez.

11

Adoromp war ar groñaz
Mestr an dud a-viskoaz.
Hen adoromp hep damant
En neñv hag er sakramant.

12

Ra vo Jezuz adoret
Ra vo meulet ha karet.
Met dreist-holl meulomp Jezuz
Er sakramant sou|ezus.

AN OFERENN

«x»

PENN-KENTA AN OFERENN

Ton : Adoromp holl, e Sakramant.

1. War ar gro|az, Hor Salver a dremene,
Evit gounit ar baradoz d'hon ene.
En oferenn bremañ e kinnig d'imp (d'eomp) e c'hras.
Gant ar Werc'hez he c'hlevimp [si|oul ha doujus bras (bis)].
2. Douget omp bet d'ar pec'hed, gant hon techou,
Pec'hed hon eus ha pec'hed bras awechou.
Met keuz hon eus bremañ da veza glac'haret.
Eun Dou|e ken hegarat [ag eur Vamm ken karet (bis)].
3. En ho komzou, deut, er Skritur, davedomp
Hep dou|etañs, a greiz kalon, e kredomp.
An holl levriou santel, gant feiz a resevomp,
An avi|el dreist-holl, [gant doujañs, a glevomp (bis)].
4. En hoc'h iliz a-grenn e kredomp c'ho|az,
Rak, gant ho kras, ne fazi|o bisko|az.
E kredo hon Iliz ne cheñchomp ket eur ger.
Ha laouen e sentimp [ouz he lezennou ker (bis)].

EVIT KINNIG AN OFERENN

Ton : A vremañ betek ar maro.
Gul|erhiez santel a lein en nean.

1

An oferenn-mañ benniget
A zo ganimp holl kinniget,
Evit adori, gant splann|ed,
Tri Ferson karet an Dreinded.

2

E trugarez eus ho krasou,
Evit hoc'h holl madelezou,
Resevit, Tad karantezus,
Korf ha gwad sakr ho Mab Jezuz.

3

En oferenn e c'houlennomp
Ma skuilho Dou|e grās ennomp.
Evit ma vo largentezus,
E c'houlennomp dre Vamm Jezuz.

4

Evit dilez hor pec'hejou,
Hon holl mankou, hon torfejou,
E kinnigomp E Vab karet
Da Zou|e, hon Tad kounnaret.

5

Enor bepred d'hon Doue-Tad ;
Enor d'ar Mab, hor « Pastor mat ».
Ra vo meulet ar Spered-Glan
Dre hor bedenn ha dre hor c'han.

GOUDE AR GORREOU

Ton : Ni ho salud, korf ma Salver.

1

Soublomp hor penn, d'ar gorre|ou,
Dirak Salver hon ens|ou,
Eus ar baradoz diskennet
Ha war an aoter astennet.

2

Warnan hol lagad o para
Ne wel nemet gwin ha bara.
Met korf Jezuz a zo dalc'hmat,
Dindan ar spesou, gant e c'hwad.

3

Jezuz, hep E c'hlo|ar amañ,
A welomp dirazomp bremañ.
Hen adoromp en izelded
Evel en neñv, en uhelded.

4

Kredomp, breudeur, gant eur feiz kreñv,
E Jezuz amañ hag en neñv.
Kasomp, evit E largentez,
D'Ezan, dre Vari, karantez.

»0«

AR GOMUNION

»0«

ABEGOU AR GOMMUNION

Ton : Deut, va Doue !

Diskan

Deu|it, Jezuz, gant ho korf hag ho kwad,
Deu|it ennoun d'am chench ennoc'h ervat.

1. Sakramant an Aoter, va Salver, ho peus krou|et,
Evidoc'h da veza, war an dou|ar, va bou|ed.
2. Evit va brasa mad hag evid ho plijadur,
E karfec'h va c'hrenvât dre sikour ho magadur.
3. Ar vamm a zo laouen, pa zebr mat he bugale,
Bara va mamm garet a gemerin dizale.
4. An Iliz kennebeut n'ehan ket d'hon ali|a
« Da gemer, da zibri », da vont da gomuniâ.
5. Pena|os dinac'h mont, pa c'houzoun ez oc'h, Jezuz,
Karantez va c'halon, va Dou|e madelezus ?
6. Taget eo, Pastor mat, ho tañvad gant ar c'hleñved.
Davedoc'h e teu|an, medisin kuñv an deñved.
7. Hepdoc'h ez oun, Jezuz, eun dañvadig gourvezet,
Pastor ebet d'ezan ha gant an holl dilezet.
8. Evel eur c'hre|oñ (1) sec'h va c'halon 'zo disec'het,
Gant glizenn ho krasou, torrit da vat va sec'hed.

(1) Kreoñ : toison.

9. Va c'halon a zo paour hag er brasa dienez.
Gant ho pinvidigez e vezin el levenez.
10. Gant herr ez an neuze d'ho tigemer, va Jezuz.
Goulskoude, pa soñjan, va c'halon 'zo vil euzus.
11. Ne gredan ket eta tostât ouz hoc'h uhelled.
Met ar Werc'hez ennoun ho koulenn 'em izelled.

EFEDOU AR GOMMUNION

Ton : Ar Re c'hlas : Elez eus ar baradoz.

1. Evit maga hon ene, Jezuz en deus krouet
Sakramant e garantez, sakramant ar boujed.
E sakramant an Aoter en deus Heñ d'imp savet
Ar prezijusa boujed a c'hell beza kavet.

Diskan

Plijet ganeoc'h diskenn, o Mamm garantezus,
'Em c'halon ken diskempenn, evit reseo Jezuz.
Va sikourit goudeze da zerc'hel d'ar grasou
Digaset d'in gant Jezuz dindan kuz ar spesou.

2. Ya ! sakramant an Aoter eo boujed an ene.
Rak, er goñan diweza, derc'hent m'hon dasprene,
Hor Salver a zisklerie, dre gas grasou d'E Dad :
« Va c'horf a zo gwir boujed ha gwir evaj va gwad. »

3. Ar gomunion santel a zalc'ho d'ar yec'hed,
Hag, er galon, a dorro d'an naññ, d'ar sec'hed.
« An neb a zebro va c'horf, an neb 'evo va gwad
« E gwirionez, m'hel lavar, a chomo beo dalc'hmat. »
4. Gant magadurez founnis ar yec'hed a ra berz.
Jezuz, er gomunion, d'ar galon a ro nerz.
Neuze kalon-ha-kalon, gwalc'het holl gant ar c'hras,
An ene muioc'h mui da Jezuz a ro plas.
5. Allas ! ar gwella kristen a c'hell beza louzet ;
Hag evit mankou bihan awechou gourdrouzet.
Met gant ar gomunion e vez bujan gwalc'het
Ha goude, gant brec'h Jezuz, er glanded leun dalc'het.
6. Ar c'horf marvel e-unan, warlerc'h ken bras eurvad,
Da zerc'hel start d'ar glanded a zo douget ervat
O tont er c'horf Hor Salver a skub ar youlou fall
A zigresk da vihana d'o galloud ha d'o gwall.
7. Nag eun dudi, kristenien ! frejalzusa mister !
Reseo korf Mab ar Werc'hez en hor c'horfou dister !
Ar c'horf, o tougenn Jezuz, en devo meritet
Beza, gant eur gwir nevez, eun deiz resusitet.
8. Warlerc'h ar gomunion, al laouenidigez
A gresk e-kreiz ar familh hag er gevredigez.
Evit derc'hel ar peoc'h, e pep korn eus ar bed,
Dreist Sakramant an Aoter, gwelloc'h liamm n'eus ket.
9. Netra gwelloc'h ne c'hellan eget oc'h aliñ,
Evit gounit seurt madou, mont da gomunia.
Kerzit, kerzit alies da c'houlenn ar bara.
Er bed lous-mañ ho talc'ho hep en em gailhara.

NANN, N'OUN KET DIN

War dôn : Bosenn Elliant.

Diskan

Nann, n'oun ket din, o Dreinded-Sakr,
E teufec'h ennoun, den fallakr.
Met gant ho ker e vin pare
Hag evit ho loja dare.

1

Mari, va Mamm ha Roujanez,
Va sikourit 'em dijenez.
Gwelit : gwan eo va strivadou,
Deuit ennoun gant ho madou.

2

Douje va zad, nann n'oun ket d'in
E ve rannet ar c'hras-se d'in.
Met sellit ouz ho Merc'h karet
N'he deus morse ho klac'haret.

5

Mari he deus gant he danvez
Va c'hinklet evit ho panvez.
Deuit, O Mestr karantezus.
Deuit ennoun bremañ, Jezuz.

GRASOU GOUDE AR GOMMUNION

Ton : O va Jezuz ! O va C'harantez !

1. Etre divrec'h ho Mamm, ho lakañ, o va Jezuz.
De|oc'h e kinnigan he c'halon karantezus.

Diskan

O Salver Jezuz ! O va Douje mat !
Chomit 'em c'halon ; renit enni dalc'hmat !

2. En em ginnig a ran, o Jezuz, da vat d'e|oc'h.
Rak ne vennan netra nemet beva gane|oc'h.
3. Ennoun hoc'h adoran, Jezuz, evit va Douje.
D'e|oc'h, gant karantez, e sujan, o va Rouje.
4. Evit ho madelez, va bennoz a ginnigan.
Evit hoc'h holl madou dre Vari ho pennigan.
5. O Jezuz, pa 'z oc'h mat, e kredan c'ho|az goulenn
Evidoun ar glanded, eun ene digoumoulenn.
6. Jezuz, skuilhit bennoz war va holl gerent karet
Em eus daoust d'o freder, gwall alijes glac'haret.
7. C'houi, va Jezuz, a gar an daouarn madoberus.
D'am madoberourien rojit grasou niverus.
8. Jezuz, bezit brokus e-kenver ar bec'herien.
Gant ho kras ra vezint ho gwella servijerien.
9. N'ankounac'ha|it ket an ana|on dilezet.
Skuilhit ho levenez, en o c'halon enkrezet.

EVIT TRUGAREKAT DOUE

Ton : Bénissons à jamais : Meulomp holl da jamez.

Diskan

Kasomp holl hor bennoz, } (bis)
Da Zouje, bemdez, bemnoz }

1
An Dreinded, dre vadelez
He deus krouet ar bed.
Ar vuhez en deus bet
Dou'ar, tud hag ajelez.

2
Pep tra krouet, gant evez,
A vezo diwallet;
Hep ma vezo gallet
Kas da get netra nevez.

3
D'an dud, d'an anevaled
Ho peus, gant karantez;
Er bed, e puilhentez,
Douje, boujed ingalet.

4
Ar parkellier, ar geuniou (1)
A zo holl bleunvennet.
Bez' ho peus kempennet
Dilhad dispar d'ar bleuniou.

5
An den dreist-holl a gargit
Gant madou dreist-bojaz.
E gorf gwan ha nojaz
A wiskit hag a vagit.

6
Evit daspren hon ene,
War ar menez kalvar,
Gant pojan dilavar,
Hor Salver a dremene.

(1) Marais.

7
Gant Jezuz ez omp salvet,
Gounezet da Zouje.
Hor breur hag hor Rouje
En deus d'an neñv hor galvet.

8
Breudeur ez omp da Jezuz,
Gwir vugale d'an Tad.
Bez' ez omp temp' ervat
D'ar Spered karantezus.

9
D'imp eo kinniget c'hojaz,
Evit beza hor Mamm,
Mari, Gwerc'hez hep namm,
Gant Jezuz, war ar grojaz.

10
Jezuz a deu d'hor maga,
Gant e gorf hag e c'hwad.
Ar boujed-se ker mat
A venn outan hor staga.

11
Nann ! n'eo ket a-fragadou,
Ma karomp sellet piz,
E pep lec'h, e pep giz,
Douje hor c'harg a vadou.

12
Da c'hedal ma tremenimp
Dre zor striz an neñvou,
En dudi ha kañvou,
Hep ehan ra ziskanimp :

Ar Galon-Sakr

— » « —

KARANTEZ AR GALON-SAKR

Ton : O Kalon-Sakr eus va Jezuz.

Diskan

**O Kalon-Sakr, Kalon Jezuz,
En hor c'heñver madelezus,
Skuilhit warnomp e puilhentez,
Teñzor divent ho karantez.**

1
Dre garantez oc'h diskennet
Hag eus Mari ho peus tennet
Eur c'horf heñvel ouz hon hini,
Eur galon douget holl d'imp-ni.

2
E Bethlejem, e Nazareth
Ho peus, Den-Douje, hor c'haret.
Karet ho peus hed ho puhez;
Ouz an holl ho peus bet trujez.

3
Ar galon glan a blij d'elec'h
Perz he devez en ho pelec'h.
Da gement a venn chom gwenn
E rannit karantez sant Yann.

4
Karout a rit ar vugale,
Rak hed ho tri blojaz bale
Ho peus roet bennoz d'ezo
Ha poket da lod anezo.

5
D'ar c'horf sammet gant ar bolan
D'an ene beuzet en dojan,
E rannit pare, levenez.
Ne lezit den en dijenez.

6
Ho kalon dreist-holl a drec'her
Gant daerou ha keuz ar pec'her.
O na pegement eo karet
Ar Vadalen gwir-glac'haret !

7
Lodenna 'rit ho meritou
Dre ganol ar sakramantou
Met er sakramant benniget
Ho peus ho kalon kinniget.

8
Er grojaz ar c'hleze fallakr
En deus toullet ho kalon sakr.
Setu digor ar pondalez
A ro hent da vont er palez.

9
 Eur palez eo kalon Jezuz,
 Eur repu d'ar pec'her mezus.
 Bez 'eo palez e brijedou
 Ha gwele blot an enejou.

10
 Kalon ar Mab n'eo digoret
 Nemet gant e Vamm enoret.
 Gounez eta kalon Mari
 Ha kerz e Jezuz pa gari.

«X»

AR GALON-SAKR DISMEGANSET

Ton : O Kalon-Sakr eus 'va Jezuz

Diskan

Ni 'venn digoll an dismegañs
 A resevit, Kalon Jezuz.
 Ni 'ginnig d'eoc'h gant doujans
 Kalon ar Werc'hez truezus.

1

Ho pobl karet eus ar Jude
 N'eo ket ehanet d'ho touji.
 D'ho maro gwechall e yude,
 Dirazoc'h e chom hep stouji.

2

Eun niver bras a baganed
 N'hoc'h anavezont ket c'holaz.
 Evito padal oc'h ganet,
 Evito marvet er grolaz.

3

O Jezuz, ar skismatiged
 A-ra freuz en iliz santel
 Hag eun toullad heretiged
 A reug hep ehan he mantell.

4

Etoujez ar gatoliged
 Ho peus ivez enebourien.
 Ho kalon a vez pistiget
 Awechou gant ho karourien.

5

Kalon Jezuz a zo treuzet
 Evit skuilh tan e garantez.
 Meur a galon n'int ket teuzet
 Hag a respont dre fallentez.

6

Jezuz a zo dismegañset
 Epad devez santel ar sul.
 Pa ne beder.... e vez danset.
 Allas ! an den.... e renk ar mul !

7

Ne vez klevet an oferenn
 Nemet eur wechig ha d'ar red.
 Bemdez e soñjer e merenn,
 Dibri Jezuz ne sonjer ket.

8

Lezet e vez e-unan-penn.
 D'e welout ne deujer ket stank.
 Eus an armel-sakr tud e denn
 Hag a gred e deurel er fank.

9

Goiap a vez gralet ivez
 Ouz sakramant ar binijenn.
 Ha meur a brijed o devez
 Da respont eus eur gunujenn.

10

An Iliz a vez heskinet
 Gant tud divat hag e pep giz.
 Meur a wech ne vez ket ginet
 D'ar beleg ober brezel kriz.

11

Allas ! ar bec'herien fallakr
 A gresk bepred o garventez.
 Pardonit d'imp, o Kalon-Sakr,
 Pardonit, Jezuz, d'hon hentez.

»0«

Ar Werc'hez Vari

MISTERIOU AR ROZERA

—»«—

AR MISTERIOU LAOUEN

Ton : Sonjomp d'ar genta dizenez

1
Eus eur verc'hig pemzek vloaz
En deus Doule grajet chojaz.
Ha Mab-Douje 'zo diskennet
Hag outi korf en deus tennet.

3
Jezuz a c'han war ar c'holo,
Ha lijen dister E c'holo.
Dismegansomp gantan an acour
Karomp eveltan beza paour

2
Mari, gant herr ha levenez,
A gerz en tu-hont d'ar menez.
Mall he deus da ginnig Jezuz
D'he c'hiniterv, Mamm frouJezus.

4
Jezuz, hor Salver benniget
En templ a zo bet kinniget;
Kinniget d'e Dad gant e Vamm,
Gant e Vamm, ar Werc'hez hep
namm.

5
Mari ha Jozef soujezet
A gav ar bugel azezet
En templ e-kreiz an doktored.
Jezuz eo hor Mestr adoret.

AR MISTERIOU GLAC'HARUS

Ton : Er c'henta mister truezus.

1
Pec'her, ne glevet ket klemvan
Da Salver war e dremenvan ?
Dindan e samm eo gourvezet
O koll e c'hwad, holl enkrezet.

2
E gorf gant ar skourjez freuzet,
Jezuz en anken 'zo beuzet.
Kalz e c'houzanvit, oJan dous
Evit digoll ar pec'hed Ious.

3
Gant spenn e kurunenn trojet
E benn santel 'zo gololet.
Gouzañv a ra seurt garventez
Evit hor pec'hed lorc'hentez.

4
Jezuz a zougen ar groJaz
Karget d'ezan war e skoJaz.
Ha Mari, Mamm holl glac'haret
A glev garm ar bobl kounnaret.

5
Jezuz, dre grijal e sec'hed
A varv en abeg d'ar pec'hed.
Nann biken ken n'ho klac'harimp,
Jezuz, da viken ho karimp.

AR MISTERIOU DUDIUS

Ton : Er c'henta mister glorius.

1
Korf Jezuz eus ar bez a sav,
Hag a-nevez buhez a gav.
Ar maro da vat 'zo trec'het
Hag e vrasa poJan tec'het.

3
Gant trouz avel o safari,
War an ebestel, war Mari
Eo diskennet ar Spered-Glan,
Dindan ar furm teJodou-tan.

2
Diwar ar menez Olived
Jezuz, horvez m'eo bet skrivet,
D'ar baradoz a zo savet
Dirak an ebestel tavet.

4
Ambrouget gant an aJelez
Mari, Mamm an holl madelez,
Hep ma ve bet he c'horf krignet,
En dudi, d'an neñv 'zo pignet.

5
Dirak lez an neñv, er spanded
Oc'h kurunet gant an Dreinded,
Gwerc'hez ha Mamm leun a drulez,
Hor sikourit hed hor buhez.

AVE AR GROUADURIEN

Ton : Kalon dous a Vari.

1

Ar Werc'hez soujezet
Kerkent a gleve

Gabrijel daoubleget
O komz an « Ave ».

Diskan

Ave, Ave, Ave Maria !

Ave, Ave, Ave Maria.

2

Moll dud ar bed kroulet
A gar, gant dudi,
Dirak Mari stoulet,
Bont d'he saludi.

6

Gant an droug pistiget
An dud klañv a glemm.
An Ave benniget
A dorr prim d'e flemm.

3

War muzellou koantik
Ar vugaligou
Dudijus eo kantig
An avedigou.

7

Kalz eus an dud desket
A garo, gant prez,
Gant tud izel mesket,
Lavarout hep mez :

4

Ar yaouankiz seder
A gar kaniri,
Hag a gan gant preder
Ave da Vari.

8

Er c'hojad an den foll
Bepred a gane.
D'an dud dister dreist-holl
E plij an Ave.

5

Ave tud o koza
A c'houlenn trujez.
Laouen int o kloza
Gantan o buhez.

9

Ma kar ar pinvidik
Gant Mari pledi (1),
Ar geiz 'zo birvidik
O tont d'he fed.

(1) Pledi gant : komer aked gant unan bennak.

10

Pep micher a c'hoanta
Kinnig karantez
Ha beza da genta
Er gwir bolontez.

12

En e bark, ar c'hoular
Hep chom d'ehana;
Er stal, al labourer
A gar mouskana :

11

War vor ha war doujar
Mari 'zo karet.
N'eus ket eun den kloujar
Pa vez lavaret :

13

En holl broiou, Mari
A zo servijet,
Met e Lourd hep fazi
He deus dreist plijet.

14

E pep amzer eta
E pep lec'h er bed,
Mari 'zo kareta
Roujanez 'zo bet.

KAERDER AR WERC'HEZ

1° An diskan : Bâle Arzur (Barzas Breiz) ; Pegen kaer ez eo....

2° Ar poziou : Bran (Barzas-Breiz) ; Lavar d'in-me....

Diskan

O Gwerc'hez glan hep namm ebet,
Mari, na c'houi, 'zo koant meurbet,
Koant dreist holl braventez ar bed !

1

Flourik d'an dourn warnout pa ruz,
War ar bod-roz, en dou-ar druz,
Kenedus holl out, rozenn ruz.

2

Dreist d'hol lec'hid (1) savet da benn,
Evidout da chom glan a-grenn
Na te 'zo koant, lilienn wenn !

3

Gant da goajou, gant da vleuniou
Savet el liorz, er geuniou,
Koant out, doujar, gant da c'hreuniou.

4

Ar mor 'zo koant war an aod
O ruza gant kerz eur baot (2)
Pe gwagennet drouk ha paot (3).

5

Evel gant perlez arc'hantel,
Gant ar stered war he mantell
Ez eo gwisket hor Mamm santel.

6

Skabell eo d'he zreid al lojar.
Flammoc'h heol den ne c'hojar
Eget kurunenn he glojar.

(1) Lec'hid : pri. — (2) Baot : tortue. — (3) Paot : niverus.

FIZIANS E MARI

Ton : Me a laka ar fizians (pe : Patronez dous ar Folgoat).

1

Mari, Mamm a drugarez,
Repu d'ar bec'herien,
Va mirit en ho kwarez,
Gant ho servijerien.
O va mamm, d'ho karantez
E fizian va buhez.
Pell dilouz pep fallentez
Va zalc'hit, gant trujez.

2

Eur vamm 'zo madelezus.
Ho pugel oun, Mari.
Mirit ouz ho Mab Jezuz
Ouzin da gounnari.
Rak m'E c'houzoun va Salver,
Va Doue trujez,
Gant gwir lvez E c'halver
Barner dic'hounezus.

3

Alfas ! an enebourien,
Niverus ha fallakr,
A vir ouz ho karourien
Ho karet, Gwerc'hez sakr,
Digant Satan va zennit.
Eus ar bed, ar youl-fall
Me ho ped, va zifennit,
Evel dilouz pep gwall.

4

Goude va Doue, Mari,
C'houi 'zo va brasa nerz.
Den ne c'hell va c'hailhari,
Pa vezan en ho kerz.
Roulezan karantez,
Va sikourit bepred,
Hag ho servijin doujus
Hep mank na fin ebet.

5

Douget gant ho kunvelez,
Mestrez ar c'halonou,
E virin d'ho madelez
Kinnig kunujennou (1).
Ouspenn, gant mall e klaskin
Dougenn d'ho karantez
Ar muia tud ma c'hellin
Etojez va hentez.

6

Gwelit, o Mamm dreist-karet,
Er bed-mañ, va leivou.
Va c'halon holl glac'haret
A c'hoanta d'an neivou.
Met, pa vezin o verve!
Selaouit va c'hlemvan.
Deulit, pa vin ho kervel,
Deulit da 'm zremenvan.

(1) Kunujennou : injures.

MARI, MAMM AR GRISTENIEN

Ton : Al labourerien : Santez Mari, Mamm Doue.

1

Nag eun enor souezus,
 Evit krouadurien !
 Ar Vamm-Gwerc'hez, Mamm Jezuz.
 Eo Mamm ar gristenien,
 Ennomp ouz hon mastari
 Ar pec'hed a rene,
 Buhez ar c'hras dre Vari
 A ziskenn en ene.

2

Hervez m'eo dijouganet
 N'eus genel hep glac'har.
 Gant ar Werc'hez omp ganet,
 War ar menez Kalvar.
 Er groñaz ez omp salvet
 War boulez glac'hari :
 Hag e sant Yann omp galvet
 Bugale da Vari.

3

Nag hol lignez 'zo roulez !
 Pa c'hellomp, gant gwir vat,
 Kas da Zouje hor moulez
 Hag E c'hervel hon Tad.
 Ouspenn hon eus ar c'hlojar
 Da gajout evit Mamm,
 Eur Vamm koant dreist al lojar,
 Ar Vamm-Gwerc'hez ken flamm.

4

Mari, dreist an holl mammou,
 A gar he bugale.
 Pa vezont en ezommou,
 E pourvez hep dale.
 Ken bras eo he c'harantez
 Ma kemer plijadur
 O ranna gant largentez
 Grasou d'he c'hrouadur.

5

Ar c'hleñved a glask taga
 Korf gwan ar c'hroujadur.
 D'ar vamm neuze d'e vaga
 Gant kreñva magadur.
 Hor Mamm Mari, gant grasou,
 A glask hor c'hristena,
 Dre ginnig d'imp er spesou,
 Korf sakr he Mab hena.

6

Warnomp dijou wiskamant,
 Re Mari ha Jezuz,
 E c'houzanvimp hep damant
 Frimm ar pec'hed euzus.
 Gant ar Werc'hez diwallet,
 Da Satan e vimp trec'h.
 Gantan ne vimp ket gwallet
 O chom dindan he brec'h.

7

Gwell eget gant hor mammou
 Omp gant Mari desket.
 Ne ro ket d'imp a-dammou
 Eur skijant kemmesket.
 Eur sklerijenn hep muzul
 A skuilh war hor spered.
 D'an neb a glev he c'huzul
 Plasou brao 'vo miret.

8

Alas ! kelennadurez
 Ne vez ket rolet ken ;
 Hag hep he magadurez
 Ar volontez a gren.
 Ar gristenien kennerzet
 Gant harp ar Werc'hez kreñv,
 Egiz sent ha sentezed,
 Dre stourm, a bign en neñv.

AR WIR DEVOSION D'AR WERC'HEZ

Ton : Ar voien d'en em asuri.

Diskan

Klevit eur sekred souezus,
 Kristenien d'an neñv galvet :
 « Kerzit dre Vari da Jezuz
 « Hag e vezot sur salvet. »

1

Da Jezuz eo mont dre Vari
 Ha dre Jezuz da Zouje
 Berr, brao, santel hag hep fazi
 Eo hent Jezuz, hor Rouje.

2

Kinniget em eus, da Vari,
 Korf hag ene ha danvez.
 Evel eur bugel o c'hoari
 E vevan deiziou hañvez.

3

E Mari, ganti ha drezi,
Eviti pep tra ma rez,
Da Zouje plijus e vezi
Epad da vuhez a-bez.

4

En distro he deus kinniget
He nerz d'in, den kizidik.
Gant madou va mamm benniget
Ez oun bremañ pinvidik.

5

Ar pec'hed ennoun a rene
Hag am dalc'he hep splannded.
Va gwisked he deus, em ene,
Gant sale gwenn he glanded.

6

Evel eur bugel o kousket,
Sioul war bruched e vamm,
Ne spontan ket, en he gwisked,
Rak Satan, rak troiou-kamm.

7

E park an ene, dre blasou,
N'oa nemet glazvez roujez.
Douret gant dour druz he grasou
E toug bremañ leiz froujez.

8

Nag evurus eo servijer
Mari, Rouanez ar bed !
Ma c'houesfer, holl e vijer
O soñjal enni bepred.

9

Bezomp eta servijerien
D'ar Werc'hez Vari, gant mall.
Hag e vimp laouen beverien
Er bed-mañ hag er bed all.

AR MAGNIFICAT

Ten :

- 1) Ar baron Jauoz : D'ar Pentekost.
- 2) Ni ho salud, korf ma Salver.
- 3) O Kalon sakr eus va Jezuz.

1

Va c'halon karget gant dudi
A gas da Zouje meuleudi.
Ha tridet en deus va spered
E Douje ,va Salver karet.

2

Savet oun bet dirak an dud
Hag an holl a veulo va brud.
Rak ennoun Mestr santel ar c'hras
En deus savet burzudou bras.

3

A-rumm-da-rumm, gant trugarez,
E ray d'an dud vat e warez.
Bras divent eo galloud e vrec'h ;
D'an dud lorc'hus ez eo bet trugarez.

4

Ar pennoù Iorc'hus diskaret,
An dud izel en deus savet.
D'an dud ezommek e ran aour ;
Hag ar pinvidik a lez paour.

5

Israël en deus heñ klevet
Hag en e dru|ez resevet.
Hervez m'en deus raklavaret,
Lignez Abraham 'vo miret.



PENAOS HO KARAN, O MARI

Ton :

- 1) Ar falc'hon.
- 2) O kalon-sakr eus va Jezuz.
- 3) O Tad, Mab ha Spered-Santel.

1

Pa vez digor ar bleunvennou,
Pa strink an he|ol e vannou,
Na kenedus ez eo hor bed !
—Mari, ken koant ha c'houi n'eo ket !

2

Ya ! karout a ran va nesa,
An hini pell, hini nesa.
Va c'halon 'zo tost d'am zud kar.
—Dreist va zud, Mari, me ho kar.

3

Evitan douget d'ar c'hleñved,
Evitan barnet d'ar preñved,
Va c'horf a'garan, den ne vam.
— Kalz gwelloc'h e karan va mamm

4

Karantez a zougan dreist-holl
D'an ene, ne garfen ket holl.
— Da Vari, gant gwir bolontez,
E tougan brasoc'h karantez.

5

C'hoant ho peus gouzout en eur ger?
Penajos ho karan, Mamm ger ?
— Mari, gant Iorc'h hel lavaran,
Mari, dreist pep tra ho karan.

6

Karout a ran gant Tereza
Lavarout e karfen beza,
Ouspenn ho sklavour doujusa,
Ho pugel karantezusa.

ROUANEZ ARVOR

Ton : Lez Breiz : Eürus an hini.....

Diskan

Rouanez Arvor, bennigit hor bro.
D'e|oc'h, gant eurvad da viken e vo. (bis)

1

Kalon hon dud koz ho peus gounezet,
Kerkent ha m'o deus hoc'h anavezet.

2

Aba, gant abeg, e vez lavaret
Eo gant holl Vreiziz ar Werc'hez karet.

3

Ar mammou du-mañ a gar Mamm Jezuz
Rak en o c'heñver eo madeleuz.

4

Hentet gant Mari, hor Breizadezed
A ya niverus da lejaneez.

5

Ar vugaligou, ken stank en hor bro,
D'ar Werc'hez, o Mamm, o lodig a ro.

6

Pep stad, pep ojad, pep micher e Breiz
A gas da Vari meuleudi, pep deiz.

7

Nag a beñ iliz a zo bet savet !
En enor d'ezi pet chapel sakret !

8

E pep korn er vro, nag a bedennoù !
Enoret e vez dre binijennoù.

9

Warnomp holl neuze Rouanez hor bro,
Skuilhit ho krasou ha beilhit d'ho tro.

10

Evit pep Breizad ha peb Breizadez,
Ra vezot bepred eun alvokadez.

11

Deuit war sikour ho servijerien.
Harpit ar c'houer, ar besketerien.

12

Pelec'h pe brezel, hor soudarded keiz
A rank herzel mat ouz an taoliou treiz.

13

Hor martoloded, er mor kounnaret,
A c'houlenñ sikour, steredenn garet.

14

D'an den klañv, d'ar yac'h, d'ar bihan, d'ar bras,
Hervez an ezomm, lodennit ho kras.

15

Dalc'hit, en eur ger, da skuilh ho pannoù,
War ar Vretoned, bemdez ha bemnoz.

AR MEMORARE, DALC'HIT SONJ

Ton : Ar c'hakous (Barzaz-Breiz) : Piou ! lavaro pebez glac'har.

1. Dalc'hit sonj mat, Mamm hor Roue,
Gwerc'hez holl douget da Zoue,
N'eo ket c'hoaz anavezet
An den ho pefe dilezet.
2. Nann ! goude m'en deus ho pedet,
En aner den n'en deus gedet.
Eus an anken ho peus tennet
An neb en deus hen goulennet.
3. Penalos neuze ne ven ket
Laouen en ho kichen bepred,
Hag e-harz ho treid azezet,
Mari Gwerc'hez ar gwerc'hez !

4. Dirazoc'h diredet, o Mamm,
E c'houlennan dilez va namm.
Bezit adarre truezek
E-keñver eur pec'her mezek.
5. N'am 'm ziarbennit ket eta,
O Mamm Doue Mamm garet.
Met resevit eur wech c'hoaz
Va goulenn hervez ho poaz.

AR VUHEZ GRISTEN

« X »

KATOLIG HA BREIZAD

Ton : O Marie ! ô Mère chérie.....
Gwerc'hez sakr, Mamm garet Breiz-Izel.

Diskan

O Mari ! Ra vezo lavaret
N'he deus Breiz trolet kein d'ar feiz gristen nepred.
Hor c'hlevit o youc'hal, gant lorc'h, o Mamm garet ; (bis)
« Katolik ha Breizad bepred. » (ter).

1

Ni 'fell d'imp ren eur vuhez gristen
E pep amzer hag e pep lec'h.
War hon dever ne gilimp biken ;
Stourm a rajimp betek an trec'h.

2

Evit ar FAMILH e c'houlennomp
Frankiz lezennoù hon Doue.
E pep familh kristen e vennomp
Lakât Jezuz evit Roue.

3

Ni 'fell d'imp e ve kavet Jezuz
Er SKOL m'emañ hor bugale,
Evit ma vezint karantezus,
Ma teskint en hent mat bale.

4

D'hor soudarded, d'hor martoloded,
Ar gwir a c'houlennomp c'hoaz
Da gas o fedenn, en em vodet,
Dirak o Salver e kroaz.

5

D'o zremenvan, hon dud koz karet.
A c'houlenn, en ospitaliou,
Da veza ganto diglac'haret,
Beleg ha kroaz er saliou.

6

Ni 'fell d'imp difenn hor frankizioù
A Vreiziz, a gatoliged.
Pa 'z int mat, ni 'zalc'ho d'hor
[gizioù,
Hag e vemp gant lod pismiget.

7

En hon touez ne vo ket kavet
Kazetennoù na dañsoù lous.
Kantigoù santel a vez savet
Ha kanet c'houek pe kreñv gant trouz.

8

En hon tije e karer pedi
Holl asamblez, goude koan.
Hag ouz Doue d'ar sul o pledi
E vez distanet d'ar boan.

9

Holl e chomimp kristenien fejal
En ti-familh hag en ti-kêr.
Hag ouz hor Breiz e vezimp lejal.
Breiziz kristenien, en eur ger.

DA FEIZ HON TADOU-KOZ

Diskan

Da Feiz hon Tadou-koz, ni, Breiziz, 'vo fejal ;
Ni bepred he c'haro.
Gant Feiz hon Tadou-koz, en hor c'halon lejal,
Ni holl a vo faro.
Nac'h Feiz hon Tadou-koz ? Neuze ni da grijal :
« Nann ! kentoc'h ar maro ! » (3 gwech).

1.

En eur familh gristen, gant eurvad, ez omp ganet,
Hag en Iliz santel raktal omp bet kaset.
Aba, d'ar feiz gwirion, hep ma vemp bet ehanet,
Hon eus, en hor c'halon, karantez pourchaset.

2

Ar gonfirmasion he deus en ene silet
Nerz nevez didrec'hus, nerz ar stourmerien kreñv.
Ni 'zo kristenien *start* ! Biken ne vezimp pilet
Gant an enebourien, e spi war hent an neñv.

3

An dervenn, en doujar, a gas da bell he gwriziou,
Evit gallout herzel ouz kement barr-avel.
Avel an Drouk-spered hag ar bed gant e c'hiziu,
Enep hor Feiz, a glask, met en aner, sevel.

4

War tornadou hor Breiz ar reier 'zo douñ plantet.
A-gas pe dre lipât, ar mor o c'hlasak tenna.
Ar Feiz, en hor c'halon, kalz doumaoc'h a zo sanket,
Flour pe drouk ar youll-fall n'he c'hell diwrizienna.

5

Ya ! hor Feiz a zo *krenv* ! Rak ouz Jezuz omp staget.
Evel ar skourrou glas stag ouz ar c'hef gwini.
Evel an ilijo gant gar ar wezenn maget,
Gant buhez hor Salver, e vagomp hon hini.

6

An dour a lintr, a c'hoarz, e kreiz ge|ot ar pradou.
An dour-red a chom glan dre ma talc'h da redek.
Skedus en hor spered eo chomet Feiz hon Tadou.
Digemmesk eo dalc'het gant ar Vreiziz kredek.

7

Nann ! n'o deus ar Vreiziz *nac'het* o feiz bisko|az,
Kentoc'h, war doujar Breiz, brug ha lann a sec'ho.
Ar Vretoned bepred a vo dougerien kro|az.
« *Katolig ha Breizad* ! » Den biken n'hon trec'ho !

8

Hor Feiz 'zo *birvidik* ! Ni 'sent ouz al lezennou.
Ni 'zo kristenien rik, direbech ha dispont.
Da vou|ez an Iliz, o komz er goure'hennennou,
Da vou|ez hon Doue, ni gant lorc'h, a respont :

9

Hiviziken eta, kenavo mat d'an dan|sou,
D'ar mignoned fallakr, da gement ober fall !
Né ginnigimp morse da Jezuz dismegansou.
Bepred war an hent mat, e kerzimp holl divrall.

ME 'ZO KRISTEN

Ton : Je suis chrétien !

Diskan

Me 'zo kristen ! brasat dudi !
 Me 'zo kristen ! Setu va nerz,
 Va ger a drec'h, a veuleudi.
 Me 'zo kristen ! Hep spont me 'gerz !

1. Me 'zo kristen ! E-barz an Iliz,
 Eus bet skuilhet dour war va fenn.
 Ha d'an ampoent ec'h en em welis
 He gwir bugel, 'em ene gwenn.
2. Me 'zo kristen ! Va zad eo Dou|e.
 Outan e fell ganiñ senti.
 Kentoc'h dinac'h va zad ha Rou|e,
 E c'houzanvin merzerenti.
3. Me 'zo kristen ! Me 'zo breur Jezuz,
 An Dou|e deut d'hon dasprena.
 Nann ! nann ! biken ne vezin mezus
 O vont da heul va breur hena.
4. Me 'zo kristen ! Me 'zoug ar Spered,
 Ar Spered-Glan karantezus.
 Lojeiz ennoun en deus kemeret.
 Eurvad dispar ha sou|ezus !
5. Me 'zo kristen ! Me 'zo gwir bugel
 Da Rou|anez ar bed krou|et.
 Savet oun bet d'eur renk ken uhel
 Dre nerz ar c'hras ganti ro|et.

6. Me 'zo kristen ! Dindan ar gro|az,
 Lorc'h ennoun, e kerzin bepred.
 Fors pegen kriz, krisoc'h ha bo|az,
 E vo Satan, ne gilin ket.
7. Me 'zo kristen ! Na glask ket, douar,
 Va zale|a gant hentchou-tro.
 Da he|ol 'zo teñval ha klou|ar
 E-tal he|ol skedus va bro.
8. Me 'zo kristen ! Me 'zo gwir vro|ad
 Ar baradoz, ar vro hep par.
 Dre nerz va Mamm, em ezo dro|ad
 Da vont enni, bu|an, hep mar.



AR GROAZ SANTEL

Ton : Vive Jésus ! Vive sa croix !
 Meulomp, meulomp a vouez uhel.

Diskan

Kanomp uhel, kanomp c'ho|az }
 « Bevet Jezuz hag e gro|az. » } (bis)

1

Bevet Jezuz war e gro|az !
 Ra vezo gant an holl dud karet.
 Rak e c'hwad santel a ro|as
 Evit trec'hi hon Tad kounnaret.

3

Rá vezo meulet ar gro|az !
 Gwezenn sakr frou|ezenn ar vuhez.
 Gwalc'het gant gwad ruz ar glo|az
 Dalc'hmat e tenn warnomp an druez

2

Ra vezo meulet ar gro|az !
 Kojad enoret ha divezus,
 Aba m'eo bet war di|ousko|az
 Mab-Doue, hor Salver tru|ezus.

4

Ra vezo meulet ar gro|az !
 Banniel ha gwalenn-priñs eun Doue
 Astennet eo warni no|az
 Evel war blota gwele-Rou|e.

5

Ne 'z adoromp ket ar grolaz,
N'adoromp nemet hor Mestr karef
Met enoret a-viskoñaz
Eo bet en hor c'halon glac'haret.

6

Meulomp hep ehan ar grolaz f
Ganti Jezuz a ra burzudou.
Diwarni d'imp e komz c'hoñaz :
« Va breudeur, kerzit war va roudou »

7

Kristenien, karomp ar grolaz f
Gant re Mari meskomp hof leñvou.
Da c'houzañv mat bezomp bolaz.
Heñt ar grolaz eo hent an neñvou.

SANTEZ ANNA

Ton : D'hor Mamm Santez Anna.
Mari, Gwerhez santel,
O Mamm a garante.

Diskan

Itron Santez Anna,
Patronez ker hor Breiz,
Kendalc'hit da ranna
D'hor bro gras ar gwir feiz.

1

Karet eo gant an hell
Mamm-goz ar kristenien.
Met gant Breiziz e koll
He gwella karourien.

2

Mamm Douje hag hor Mamm,
Hor gwir gwerelaouenn,
Mari, Gwerhez hep mamm
Ho peus ganet laouen.

3

Karet dreist pep den all
Ho peus Mabig ho Merc'h.
Mirit dijeuz pep gwall
E vredeur war e lerc'h.

4

Dalc'het ho peus d'hor feiz.
Rakse ni gar respont :
« Kristenien omp, e Breiz,
« Ha Bretoned' dispont. »

5

Santez Anna, war Breiz
A skuilh donezonou,
Hag eur garantez reiz
A vleugn er c'halonou.

6

Ne vank ket bugale
E ti Breiz-Izeliz.
Prim e teskont bale
E lezenn an Iliz.

7

E meur a lec'h bremañ
An doujañs zo mouget.
Dian tudou-koz du-mañ
Enor a vez douget.

8

Mirit, en hon toujez,
Karantez hon dud koz.
E Breiz, ra vo roujez
Ar geiz hep ti nag ez.

9

Hor prijeou kristen
Mirit yac'h, evurus.
Plasit en o c'hichen
Bugale niverus.

10

Bennigit, o Mamm-goz,
Ar vugale vihan.
Gant ho prech' mirit kloz
Ha paour ha mondijan.

11

Hor martoloded keiz,
Gwintet war ar mor glas,
Ho pad bepred gant feiz.
Rojit d'ezo ho kras.

12

Lodennit d'hon tud klañv
Ho gwella pennoziou.
O fojan a vo skañv,
Lirzin o menozioù.

13

Gant mestr an droug trec'het
Ez eus gwall beverenien.
Rojit keuz ar pec'hed,
O Mamm, d'ar bec'herien.

14

Hag e kasimp dalc'hmat
Davedoc'h hor pedenn.
Santez Anna, Mamm vat,
Dousa kanevedenn.

AN TAD MONTFORT

Ton : Mari 'vo brepred..... ; Nous venons encor du pays d'Arvor.

Diskan

Ennoc'h, Tad Montfort

E klaskomp konfort.

Deskit d'imp karet

Jezuz glac'haret.

Grit ma vimp devot e-keñver hor Mamm,
Grit ma vimp kristenien hep namm.

- | | |
|--|--|
| 1. Bepred ra vo kanet
Den santel hor gwad :
En hor Breiz eo ganet
Montfort « an Tad mat ». | 5. Paour-ran hag heskinet,
Kaset-digaset,
Morse n'en deus ginet
D'ar samm pourchaset. |
| 2. E galon, ez-vihan
En deus kinniget
Ha dalc'het hep ehan
D'e vamm venniget. | 6. Dre gomz ha dre gana,
E kornog Bro-C'hall,
E stourm hep ehana
Enep pep youl fall. |
| 3. Hag ar Werc'hez santel
He deus, gant grad-vat,
Distennet he mantell,
War Montfort dalc'hmat. | 7. O kinnig ar gro az
Ez eo bet gwelet.
Na pet a zistroas
Gant ar chapeled ! |
| 4. Karout a ra Jezuz,
Jezuz er gro az.
D'ezi karantezus
E soubl e sko az. | 8. Bez' e komz entanet
Ouz kalon Jezuz.
Hag ar Vande aned
A zeu holl nerzus. |
| 9. Ra vimp tud a gredenn
Hag a vuhez vat,
Dre zikour ho pedenn
Din ouzoc'h, o Tad ! | |

Ar Bloaz Santel

«x»

KANTIG AN ASVENT

Ton : « Creator alme siderum ».

Diskan

O neñvou, skuilhit ho klizenn.
Glavit anden just, olizenn(1)
Kellidit, dou|ar, ar Salver
Hep ehan er bed a c'halver.

- | | |
|---|--|
| 1
Eus Jakob savit, o sterenn;
En dou ar skignit ho skleurenn.
Mab-Dou e ganet er c'hra ou,
Teuzit noz-teñval ar ga ou. | 4
Ne 'z omp ket ken evit herzel;
Ne glever nemet trouz brezel.
Priñs ar pe oc'h, stourmit ganimp
Ha meur a drec'h id a ganimp. |
| 2
An dud a gerz war an hent fall,
D'o drouk-youl e plegont gant mall.
O di arbennit, va Dou e;
O renit gant ho paz-rou e. | 5
Gant an anken ez omp brevet.
D'ar bouzar ro it ar c'h eved.
Distac it ar gomz d'ar re vut;
Rannit ar pare d'an holl dud. |
| 3
Gant a ezenn brein ar pec'hed
Ez eo pep vertuz disec'het.
Bleupvenn savet war skourr Jesse
Balsamit ar bed alese. | 6
Ra vo d'imp addiskou ezet
Ar burzud bet digou ezet ;
Eur werc'hez hep distera namm
D'eun Dou e-den bet ar gwir Vamm. |

(1) Lizenn : koumoulenn.

7

Diskennit eus ho troñ uhel.
Ra vezot hon Emmanujel.
Chomit goude war an doujar
Da domma hor c'halon klouar.

Aozit, Mari, hor c'halonou,
O c'hargit a zonezonou,
Evit ma vezint da Jezuz
Eur c'havell blot hag holl plijus.

NEDELEG

Ton : 1) La terre dort.....
2) Ton nevez gant A. Mayet.

1
Dindan ar volz steredennet
An doujar a zo kousket.
Mantell an noz 'zo distennet
War beg ar gwez du gwisket.
Dindan ar volz steredennet
Ar bed 'zo sijoul astennet.

2
E-kreiz an noz, en eur c'hraouig,
Hor Salver a zo ganet.
Mari he deus gant he zraouig
E gorf bihan lijenet.
E-kreiz an noz, en eur c'hraouig,
Evel an distera paourig.

5
D'eoc'h ivez Mabig Jezuz,
Ni deu bremañ da gana.
Bugel-Douje madelezeus
Bannit puih ho kalanna.
En ho keñver, Mabig Jezuz
Ni 'vo bepred karantezus.

(1) Bugulien : pastored.
(2) Neo : kavell.

8

O NOZ SIOUL

Ton : 1) Stille nae'ht !
2) Ton nevez gant A. Mayet.

1
O noz sioul ! O noz santel !
Mari, gant he mantell,
D'he bugel-goudor he deus klasket.
War he c'halon, tenera gwasked,
Jezuz a zo kousket. (bis).

2
O noz sioul ! O noz santel !
Er prezeb (1) distrantel,
Gourvezet war eur guchennig plouz
Dindan gwarez e Vamm gwerc'h ha dous
Jezuz a chom didrouz (bis).

3
O noz sioul ! O noz santel !
Talvoudusa kentel !
Desket d'imp gant Jozeb ha Mari.
Puchet sijoul ouz Herr adori.
Meulomp hep safari. (bis).

4
O noz sioul ! O noz santel !
Eur galon hep antell
O deus ar vugulien kinniget.
Ha pe'oc'hus o deus prezeget.
D'o Salver benniget (bis).

(1) Prezeb : kavell.

KANTIG AR BASTORED

Ton : Ar baron Jauoz : D'ar Pentekost...

Diskan

Ra vo meulet e barr an neñv

An Doue dous, an Doue krenv

Ha d'an dud eeun er bed-mañ

Levenez ha pelec'h bremañ.

1
E Bethleem, e kêr David.
Safar, en noz-mañ, a gavit.
Met ar vugulien er maez
A ro diskuiz d'o c'horf faes.

2
O daoulagad a zo dam-kloz;
Tremenet eo hanter an noz.
Prim warno sklerder 'zo fuilhet
Hag ec'h engavont strafuilhet.

3
« Na spontit ket, buguligou (1)
Na c'houi nag ho teñvedigou.
Klevit eur c'hel faouen meurbet :
Ganet ez eo Salver ar bed. »

4
« En eur c'hoz kraouig p'engavot
Eur bugelig koant a gavot.
Ar mailhurenou hen c'holo;
Gourvezet eo war ar c'holo. »

5
Lavarit d'imp 'ta, pastored,
Endra m'edoc'h holl emvoret
Petra ho peus gwelet fenoz
Hag a ra d'elec'h skuilh bennoz ?

(1) Buguligou : pastored.

6
« Gwelet hon eus Kannad Dou e
Kaeroc'h eget brava rouje.
Klevet hon eus eur c'han neñvel
N'hon eus morse klevet heñvel. »

7
Teuzet ar gwel hag ar c'hleved
Ez eo dilezet an deñved.
« Da gêr Bethlejem p'hon galver
E|omp da welout Hor Salver. »

8
Kavet o deus er c'hoz kraouig
Mari ha Jozeb o daouig.
Kavet o deus Mabig Doue :
Dirazan an holl a stoue.

9
Rolet o deus o frofigou
Ha mouskanet o c'hantigou.
Hag e tizrolont soujezet
Gant ar burzud 'zo c'hoarvezet.

10
Mabig Jezuz, ni deu d'hon tro
D'ho kanmeuli gant yez hor bro.
Resev it hor gourc'hemennou,
Rannit bennoz d'hor pedennou.

KANTIG AR ROUANED

PE GOUEL AR MISIONOU

Ton : 1) Ar re Unanet : Diskennomp holl, kristenien.
2) Ar Re c'hlas : Elez eus ar baradoz.
3) Al labourerien : Santez Mari, Mamm Doue.

1
Petra 'zo degoujezet
En oabl steredek ?
Perak e chom soujezet
An hudour (1) speredek ?
E bolz an neñv, eur sterenn
Lugernus holl a sked.
Lirzin e strink he skleurenn
Evit Salver ar bed.

2
Eus ar Reter (2) tri Rouje,
Warlerc'h ar steredenn,
A gerz da glask o Doue
Deut war hor blanenn.
Met ar skleur a zo teuzet
E kêr-benn ar Jude.
Hag an tri maj enkrezet
D'ezan a hirvoude.

3
Ar Majed o deus klevet
E kêr Jerusalem
E rank, hervez m'eo skrivet,
Genel e Bethlejem.
Ar steredenn addkavet
O c'has betek eur c'heo.
Hag ar roue|ed tave
A buch dirak eun neo.

4
Dirak ar Mabig Jezuz
Ar Majed a stouje
Ha gant eun dremm mousc'hoarzus
Ec'h adorent Douje.
Kinniget o deus ezañs
Hag aour ha myrrh a briz.
Keuzia 're|ont d'e vezañs
En eur-vont war o c'hiz.

5
An devez-mañ eo gou|el
Hor c'hentadou pagan.
Drant kanomp eta : « Nou|el ! »
Da wir an dil|ougan :
« Bugale 'zo diredet
A bep lec'h d'an Iliz. »
Skleur ar gwir en deus skedet
Warnomp Breiz-Izeliz.

6
Allas ! er broiu goujez
Eus c'ho|az paganed.
Ne glevit ket o moujez
O c'houlenn leaned ?
N'o c'hlevit ket o c'hervel
Breudeur, leanezed ?
Ra vo gwelet o sevel
Breiziz, Breizadezed.

(1) Hudour : maj.

(2) Reter : sav-heol.

7

Kinnigomp donezonou
D'ar c'hrouadurig paour
Met gweli e kav kalonou
Eget kinnig hon aour

Kinnigomp hor pedennou,
An ezafis an dousa.
Gant myrrh hor pinijennou
Sikouramp 'hon nesa.

Evit Gouelioù ar Mision

«x»

EVIT EN EM OUESTLA D'AR WERC'HEZ

ITRON VARIA AR C'HALONOU

(pe Kinnig ar c'halonou)

Ton : O Mamm e garante, pedet....

Diskan

Rouanez hor c'halon, Mari, Mamm benniget,
Her resevit a-bez, er galon kinniget.

1

Digemerit hor c'horf, gant e holl izili.
Hel lakât a vennomp a-zindan ho peli.

2

Gant ar galon ivez resevit hor madou,
Hol leve, hon danvez : arc'hant ha dilhadou.

3

Er galon, an ene : spered ha bolontez,
A zigasomp lirzin da zalc'h ho karantez.

4

Hor c'halon eo grasou, grasou dreist-talvoudus,
A zalc'hot d'hon ene, Mamm ker ha galloudus.

5

Ar prof eus kement omp hag eus kement hon eus
A ginnigomp da vat, gant dudi hag hep keuz.

KINNIG AR C'HURUNENNOU

Ton : Gloar da Jezuz !

Diskan

Gwerc'hez Vari ! Resevit hor profigou.
Gwerc'hez Vari ! Mamm ar vagaligoù,
Digemerit hor c'hurunenn kempennet
Gant bleun dister met gant kalon plezennet
Gwerc'hez Vari !
Hor Mamm Mari !

1

Gwerc'hez Vari ! krouet oc'h bet hep pec'hed
Gwenn eo bleunioù kurunenn ho pugale,
Gwenn eo bleunioù kurunenn ho pugale,
Rak, er glanded, bepred er vennont bale
Evel Mari,
O Mamm Mari.

2

Gwerc'hez Vari ! war ar c'halvar glac'haret.
Gwerc'hez Vari ! Pa varv ho Mab karet.
Bleunvennig ruz ar gurunenn a lavar

E vennont gouzañv ha sevel d'ar c'halvar
 Davet Mari,
 O Mamm Mari.

3

Gwerc'hez Vari ! Gwerc'hez holl-garantezus.
 Gwerc'hez Vari ! Mamm hor Salver Jezuz.
 Ho pùgale gant o c'hurunennig aour
 A ziskuilh ne vint ket a garantez paour
 Evit Mari,
 O Mamm Mari.

4

Gwerc'hez Vari ! Sec'herez dous al leñvor,
 Gwerc'hez Vari ! Rouanez an neñvou.
 Hervez gwer ha roz o bleuniou kinniget,
 En ho kerz ez int laouen, Mamm benniget,
 E kerz Mari,
 O Mamm Mari.

5

Gwerc'hez Vari ! Mamm izel ho Mab Roue
 Gwerc'hez Vari ! Servijerez Doue !
 Izel a galon o derc'hel a re|ot,
 Evel ar bleunvennig glaz-ruz er ge|ot.
 Gwerc'hez Vari !
 O Mamm Mari.

— «x» —

EVIT GOUEL AN ANAON

War don : Kyrie an Anaon.

Doùe trugarezus, Klevit hirvoud hon dud maro.
Doùe trugarezus, O zennit eus an tan garo.
Doùe trugarezus, Klevit hirvoud hon dud maro.

O Mamm ! Ho pet trujez ouz o do|an.
O Mamm ! C'houi ho peus bet ivez po|an.
O Mamm ! Ho pet trujez ouz o do|an.

Doùe trugarezus, Klevit hirvoud hon dud maro.
Doùe trugarezus, O zennit eus an tan garo.
O Jezuz ! D'hon holl tud karet gwall-evurus,
 Rojit an diskuiz peurbadus.

Etre pozioù ar « Miserere » :

Santez Mari, rojit d'an Anaon, an diskuiz peurbadus !

— «x» —

EVIT GOUEL AN DIGOLL-PEC'HED

PARDONIT D'IMP

Ton : Santez Anna, hou peet truhé.
 Nous vous prions à deux genoux.

Diskan

Pardonit d'imp, Salver Jezuz,
 A ! bezit trujezus !

(O vont d'ar maen-badez)

1. Deut omp da ginnig karantez
Evit digoll hor fallentez.
2. E-harz ho treid, Aotrou Jezuz,
Hor gwelit pec'herien mezus.

(O vont d'ar gador-govez)

1. En Iliz santez badezet
Hon eus he lezenn dilezet.
2. Trubard omp bet d'ar promesa
Da Jezuz hep ehan beza.

(O vont d'ar gador-brezeg)

1. Kinniget hon eus kunujenn
Da sakramant ar binijenn.
2. Evel Judas, an disklibr yud
Heuilhet hor eus ar spered mut.

(O vont d'an daol-santel)

1. An dud a zo bremañ mezek
P'eo ret d'ezo klevout prezeg.
2. Ne selaouer nemet dre red,
Nemet gant eur skoujarn, d'ar red.

(O vont dirak an aoter)

1. E sakramant ho karantez
E resevit kalz garventez.
2. Nag a bet a nac'h ar boujed
Evidomp gane|oc'h krou|et.
3. Pardon, pardon p'hon eus pe-
c'het.
Pardonit, pa 'z omp asrec'het(1).

(1) Asrec'het : keuziet.

EVIT GOULENN PARDON

Ton : O va Jezuz, setu deut an amzer.
PEC'HED AR SPERED

1. O Dou|e-Tad ! Na bras eo hor pec'hed?
Gant al Iorc'h vil eo hor spered trec'het.
Pardonit d'imp bremañ, o Tad !
A galon e vezimp—izel dalc'hmat.

Parce, Domine, parce populo tue ! Ne in æternum irascaris
nobis.

PEC'HED AN TEOB

2. Furnez-Dou|e ! Jezuz, Komz a vuhez,
Eus hor c'homzou dizakr bezit truez !

Hon te|od a gaso bennoz
D'e|oc'h hiviziken — bemdez, bemnoz.

PEC'HED AR GALON

3. Spered-Santel ! na digar ez omp bet,
En ho ke|iver ha Rou|anez ar bed !
Evit hon oberou mezus
Na vezit ket re zrouk — met truezus.

EVIT GOUEL AR VELEGIEZ

- Ton : 1) Ton nevez.
2) O ! nag hir eo an noz (hep an diskan).

Diskan

Jezuz, e Breiz, dibabit beleien !

1. Evit sikour an dud da zerc'hel start d'o feiz,
2. Evit o skoazella war hent eur vuhez reiz.
3. Evit d'ar vugale beza holl badezet,
4. Evit gant an osti, ma vezimp kennerzet.
5. Da rei bennoz Dou|e d'eured ar priejou,
6. Evit d'ar bec'herien kovez o fec'hejou.
7. Da zikour ar c'hlañvour da c'houzañv e bo|an,
8. Evit hor fre|alzi, pa vezimp en do|an.
9. Evit ambroug ar c'horf betek diskuit ar bez,
10. En ano ho Mamm ger hag an Iliz a-bez.

EVIT GOUEL AR MISIONOU

Ton : 1) Santez Anna, hou peet truhé.
2) Nous vous prions à deux genoux.

Diskan

Mari, kasit d'an dud di-feiz
Misi|nerien Breiz.

1. Evit prezeg ar feiz kristen
Da bep den en dou|ar estren.
2. Evit kelenn ar vugale,
Hag o badezi hep dale.
3. Evit d'ar pec'her asrec'het
Kovez d'eur beleg e bec'hed.
4. Evit kempenn d'ar gorve|ou
Bara Dou|e d'an ene|ou.
5. Evit ma vo gwir eurejou
Etou|ez an holl priejou.
6. Evit entent ouz an dud klañv,
Ma vezint, korf hag ene, skañv.

Diskan

Mari, kasit d'an dud di-feiz
Le|anezed hor Breiz.

7. Evit rei skoazell d'an Tadou,
Dre soursial ouz ar madou.

Diskan

Mari, kasit d'an dud-difeiz
Kalz breud|eur eus hor Breiz.

Evit Bennoz ar Sakramant

— «x» —

ADOROMP HOLL

Ton : Adoromp holl, e sakramant an Aoter.

1. Adoromp holl, hep ehan, hep nec'hamant,
An Dou|e-den, dindan spes ar sakramant.
Adoromp holl Jezuz, hor Salver dreist-karet,
Kuzet, dre garantez, en osti|enn sakret.
2. Meulit Jezuz, meulit, broiou, ho Roue ;
Meulit poblou, meulit holl, meulit Doue.
Meulit Hefñ, a|elez, e barrou ho tudi ;
D'ezan, holl sent an neñv, kasit ho meulerdi.
3. Ra vo meulet an Tad, ar Mab, ar Spered,
[War an dou|ar hag en tu-hont d'ar stered.
Ra vo meulet ivez, e pep lec'h, da viken.
Rou|anez an neñvou, Mamm garet ar c'hristen.

O 'SALUTARIS

① salutaris Hostia !	Uni trinoque Domino
Quæ cæli pandis ostium ;	Sit sempiterna gloria,
Bella premunt hostilia,	Qui vitam sine termino
Da robur, fer auxilium.	Nobis donet in patria.
	Amen.

AVE MARI STELLA

Ave Maris Stella,
Dei Mater alma,
Atque semper Virgo,
Felix cæli porta.

Sumens illud Ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Hevæ nomen.

Solve vincla reis,
Profer lumen cæcis,
Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem,
Sumat per te preces,
Qui pro nobis natus,
Tulit esse tuus.

Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culpis solutos
Mites fac et castos.

Vitam præsta puram,
Iter para tutum,
Ut videntes Jesum,
Semper collætetur.

Sit laus Deo Patri,
Summo Christo decus,
Spiritus sancto.
Tribus honor unus.

Amen.

»O«

TANTUM ERGO

Tantum ergo sacramentum
Veneremur cernui,
Et antiquum documentum
Novo cedat ritui :
Præstet fides supplementum
Sensuum defectui.

Genitori, Genitoque
Laus et jubilatio :
Safus, honor, virtus quoque
Sit et benedictio ;
Præcedenti ab utroque
Compar sit laudatio.
Amen.

LAUDATE DOMINUM

Laudate Dominum omnes gen-
tes : * laudate eum omnes po-
puli :

Quoniam confirmata est super
nos misericordia ejus * et veritas
Domini manet in æternum.

Gloria: Patri, etc.

PEDENNOU GOUDE BENNOZ AR SAKRAMANT

- Meuleudi da Zoue !
- Meuleudi d'e ano santel !
- Meuleudi da Jezuz-Krist, gwir Doue ha gwir den !
- Meuleudi da ano santel Jezuz !
- Meuleudi d'e Galon-Sakr !
- Meuleudi da Jezuz e sakramant an aoter !
- Meuleudi da Vamm Doue, ar Werc'hez gloriuz Vari !
- Meuleudi da Vari, konsevet hep pec'hed !
- Meuleudi da ano Mari, mamm ha gwerc'hez !
- Meuleudi da sant Jozeb, pried glan ar Werc'hez Vari !
- Meuleudi da Zoue, dre an Elez hag ar sent eus ar baradoz !

»O«

AN HEVELEP PEDENNOU GIZ GWENED

- | | |
|--|------------------|
| 1. Ra vo meulet, e pep amzer,
Doue hag e ano santel ! | Ra vint meulet ! |
| 2. Ra vo meulet : Salver ar bed,
Jezuz, gwir Doue ha gwir den ! | Ra vo meulet ! |
| 3. Ra vo meulet ano Jezuz,
Ra vo meulet e Galon-Sakr ! | Ra vint meulet ! |
| 4. Ra vo meulet ivez Jezuz,
E sakramant eus an aoter ! | Ra vo meulet ! |
| 5. Ra vo meulet Mamm hon Doue,
Ar Werc'hez gloriuz Vari ! | Ra vo meulet ! |

- 6. Ra vo meulet ar Werc'hez glan,
Gwerc'hez konsevet hep pec'hed !
- 7. Ra vo meulet ano Mari,
Mari, Mamm ha bepred gwerc'hez !
- 8. Ra vo meulet gant pep hini,
Sant Jozeb, prijed glan Mari !
- 9. Ra vo meulet bepred Doue,
Dre Elez ha sent an neñvou !

Ra vo meulet ?
Ra vo meulet ?
Ra vo meulet ?
Ra vo meulet ?

GALVADENNOU SANTEL

- Kalon-Sakr a Jezuz,
- Kalon dous a Vari,
- Sant Jozeb, patron an Iliz,
- Santez Anna, patronez Breiz-Izel,
- Sant Kaourintin ha sant Paol, patroned an Eskopti,
- Sant X...., patron ar barrez,
- Santez X...., patronez ar barrez,
- Sant X... ha sant Y..., patroned ar barrez,
- Santez Tereza ar Mabig Jezuz,
- Hon Aeled (Elez) mat,
- Holl sent ha sentezed eus ar baradoz,

Ho pet truez **ouzimp.**
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Pedit evidomp.
Bepred bellhit **warnomp.**
Pedit evidomp.

NOZ-VAT DA VARI

Ton : Au pied du trône de Marie....

1. Na plijus bras eo dont da bedi
E-harz ho treid, o Mamm dener !
Ho tremm er sklerijenn o skedi
Bravoc'h stumm c'hoaz a gemer.
Eun dever dous a sevener
Ouzoc'h o pledi ! (1)
Mamm holl garet, skuilhit bennoz
Warnomp fenez.
2. Ho pennoz a c'houlennomp c'hoaz
Evit holl bec'herien ar bed.
Tru/ezit d'ar beurienn en no/az,
Ha d'an holl glanvourien ho ped.
Ho Mamm ! n'ankounac'halit ket,
Ez oc'h bet bo/az
Da dru/ezi da bep po/an,
Da bep do/an.
3. Ma tilezomp bremañ ho skeudenn,
Hoc'h eñvor ne zilezimp ket.
Ar garantez, ar c'hreñva neudenn,
Hor stago striz ouzoc'h bepred.
Kent ho kuitât, Mestrez ar bed,
Setu hor bedenn :
En noz-mañ hon dalc'hit hep namm !
Noz-vat ! o Mamm !

(1) Pledi ouz unan bennak : Sellat a-bann outan.

AROK KUITAT AN ILIZ

Ton : Avant de quitter Notre Maître.

1. En ho kalon dreist-karantezus,
Ec'h en em daolomp, o Jezuz.
Mestr, en noz-mañ, ra chomimp gane|oc'h,
Hag e kavimp eurvad ha pe|oc'h.
En ho kalon.....
2. Gwerc'hez Vari, Mamm dons ha karet,
Mirit mat na vemp kailharet.
Gant ho seul brevit e benn da Satan
Ha ne vezimp ket flemmet gantan.
Gwerc'hez Vari.....
O Sant Jozeb, diwaller Jezuz,
Hon harpit gant ho p'rac'h nerzus.
Dre greiz nozveziou tenval ar bed fall,
Hon hentit betek dez ar bed all.
O sant Jozeb.....
4. A|el mat, evel en eur c'hastell,
Hor c'huzit dindan hoc'h askell.
Teurvezit, epad ma vezimp kousket,
Hon derc'hel dalc'hmad en ho kwasked.
A|el mat.....
5. Holl sent ha sentezed patroned,
Hor skou|er hag hor mignoned,
Gant ho skoazell ra vimp bepred kristen,
Evit mont d'an neñv, en ho kichen.
Holl sent.....
6. En tan, pistiget gant e flemmou,
An ana|on a gas klemmou.
Jezuz, bezit trulez ouz e leñvou.
Hag o c'hasit bu|an d'an nefvou.
En tan.....

EUN NEBEUT KANENNOU LATIN

VENI CREATOR

- | | |
|--|---|
| <ol style="list-style-type: none"> 1. Veni, creator Spiritus,
Mentes tuorum visita,
Imple sup'erna gratia
Quæ tu creasti pectora. 2. Qui diceris Paraclitus,
Altissimi donum Dei,
Fons vivus, ignis, charitas,
Et spiritalis unctio. 3. Tu septiformis munere,
Digitus Paternæ dexteræ,
Tu rite promissum Patris,
Sermone ditans guttura. | <ol style="list-style-type: none"> 4. Accende lumen sensibus
Infunde amorem cordibus
Infirma nostri corporis
Virtute firmans perpeti ; 5. Hostem repellas longius,
Pacemque dones protinus ;
Ductore sic te prævio
Vitæmus omne noxium. 6. Per te sciamus da Patrem,
Noscamus atque Filium ;
Teque utriusque Spiritum
Credamus omni tempore. |
|--|---|
7. Deo Patri sit gloria,
Et Filio, qui a mortuis
Surrexit, ac Paraclito.
In sæculorum sæcula.
Amen.

MAGNIFICAT

Magnificat * anima mea Do-
minum.

Et exultavit spiritus meus *
in Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem an-
ciillæ suæ : * ecce enim ex hoc
beatam me dicent omnes genera-
tiones.

Quia fecit mihi magna qui po-
tens est ; * et sanctum nomen
ejus.

Et misericordia ejus a progenie
in progenies, * timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo :
* dispersit superbos mente cordis
sui.

Deposuit potentes de sede, * et exaltavit humiles.

Esurientes implevit bonis, * et divites dimisit inanes.

Suscepit Israël puerum suum, *

recordatus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros, * Abraham et semini ejus ins sæcula.

Gloria Patri, etc.

CREDO NISE

Credo in unum Deum. * Patrem omnipotentem, factorem cœli et terræ, visibilium omnium et invisibilium. * Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei Unigenitum. * Et ex Patre natum ante omnia sæcula. * Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero. * Genitum non factum, consubstantialem Patri : per quem omnia facta sunt.

* Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de cœlis.

Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Mariâ Virgine, et Homo factus est.

Crucifixus etiam pro nobis : sub Pontio Pilato passus, et se-

pultus est. * Et resurrexit tertia die, secundum Scripturas. * Et ascendit in cœlos ; sedet ad dexteram Patris. * Et iterum venturus est cum gloria, judicare vivos et mortuos : cujus regni non erit finis. * Et in Spiritum Sanctum, Dominum, et vivificantem, qui ex Patre Filioque procedit. * Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur qui locutus est per prophetas. * Et unam sanctam, catholicam et apostolicam Ecclesiam. * Confiteor unum baptismum in remissionem peccatorum.

Et exspecto resurrectionem mortuorum.

Et vitam venturi sæculi.

Amen.

TE DEUM

Te Deum laudamus : * te Dominum confitemur.

Te æternum Patrem, * omnis terra veneratur.

Tibi omnes Angeli, * tibi Cœli et universæ Potestates ;

Tibi Cherubim et Séraphim : * incessabili voce proclamant :

Sanctus, Sanctus, Sanctus, * Dominus Deus sabaoth.

Pleni sunt cœli et terra * majestatis gloriæ tuæ.

Te gloriosus * Apostolorum chorus.

Te Prophetarum * laudabilis numerus.

Te Martyrum candidatus * laudat exercitus.

Te per orbem terrarum * sancta confitetur Ecclesia.

Patrem * immensæ majestatis ; Venerandum tuum verum * et unicum Filium ;

Sanctum quoque * Paraclitum Spiritum.

Tu rex, * gloriæ Christe,

Tu Patris * sempiternus es Filius.

Tu, ad liberandum suscepturus hominem, * non horruisti Virginis uterum.

Tu, devicto mortis aculeo, * aperuisti credentibus regna cœlorum.

Tu ad dexteram Dei sedes * in gloria Patris.

Judex crederis * esse venturus.

(Ar pez a zo warlerc'h a vez lavaret war an daoulin.)

Te ergo quæsumus, tuis famulis subveni, * quos pretioso sanguine redemisti.

Æterna fac * cum sanctis tuis in gloria numerari.

Salvum fac populum tuum, Domine ; * et benedic hæreditati tuæ.

Et rege eos ; * et extolle illos usque in æternum.

Per singulos dies * benedicimus te.

Et laudamus nomen tuum in sæculum * et in sæculum sæculi.

Dignare, Domine, die isto, * sine peccato nos custodire.

Miserere nostri, Domine ; * miserere nostri.

Fiat misericordia tua, Domine, super nos, * quemadmodum speravimus in te.

In te, Domine, speravi : non confundar in æternum.

EUR C'HIZ VAT DA LAVARET AR ROZERA

DESKET GANT AR MISTONER BRAS, AN TAD MONTFORT.

En em unani a ran gant an holl sent eus ar baradoz, gant an holl dud just a zo war an douar, gant an holl eneoù fidel a zo el lec'h-mañ ; en em unani a ran ganeoc'h, va Jezuz, evit meuli, hervez m'eo dleet, Ho Mamm santel hag evit Hoc'h enori enni ha drezi.

Trei a ran kein da gement dievezted a deüio d'in epad ar rozera-mañ a vennan lavaret gant furnez, evez ha devosion, en he-velap doare ma ve an hini diweza eus va buhez.

Kinnig a reomp d'eoc'h, Dreinded santel meurbet, ar C'hredo-mañ evit enori holl misteriou hor feiz ; ar Batez hag an tri Ave-mañ evit hoc'h enori Tri Ferson en eun Doue. Goulenn a reomp diganeoc'h eur feiz wec, eun esperafis start hag eur garantéz birvidik.

Credo, Pater, Ave (teir gwech), Gloria Patri.

—»«—

MISTERIOU LAOUEN

1

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an dizenez genta-mañ, evit hoc'h enori o kemer korf en ho Mamm Mari. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre he fedenn, eun izal-ded vras a galon.

Pater, Ave (10), Gloria Patri.

— Grasou mister Doue en em c'hraet den, diskennit en hon eneoù.
Evelse bezet graet.

2

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an eil dizenez-mañ, evit enori ho Mamm santel o vont da welet he c'hinitery santez Efi-

zabeth hag evit enori santelidigez sant Yann-Vadezour. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ar garantez e-keñver an nesa.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister ar weladenn diskennit en hon eneoù.

Evelse bezet graet.

3

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an trede dizenez-mañ, evit enori ho Kinivelez e kraou Bethleem. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ma vimp distag diouz traou ar bed, ma tismegafisimp ar binvidigeziou ha ma kariimp ar baourentez.

Evelse bezet graet.

— Grasou mister ar ginivelez, diskennit en hon eneoù.

Evelse bezet graet.

4

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar bedervet dizenez-mañ, evit hoc'h enori kinniget en Templ hag evit enori glanidigez Mari. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre he fedenn, eur glanded vras a gorf hag a spered.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister ar glanidigez, diskennit en hon eneoù.

Evelse bezet graet.

5

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar bempvet dizenez-mañ, evit hoc'h enori adkavet en Templ gant Mari. Goulenn a reomp diganeoc'h dre ar mister-mañ ha dre he fedenn, ar gwir furnez.

Evelse bezet graet.

— Grasou mister an Adkavidigez, diskennit en hon eneoù.

Evelse bezet graet.

—»«—

MISTERIOU A C'HLAC'HAR

6

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar c'houec'hvet dizenez-mañ ha goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre

bedenn ho Mamm santel, ar gwir-keuz d'hor pec'hejou.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister tremenvan Jezuz, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

7

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar seizvet dizenez-mañ, evit hoc'h enori skourjezet betek ar gwad. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ma kastizimp hor youlou-fall.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz skourjezet, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

8

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an eizvet dizenez-mañ, evit hoc'h enori kurunet gant spenn. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, an dismegañs e-kenver ar bed.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz kurunet gant spenn, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

9

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an navet dizenez-mañ, evit hoc'h enori o tougenenn ho kroaz. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, an habasketed (ar basianted) en hor c'hroaziou.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz o tougenenn e groaz, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

10

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an deket dizenez-mañ, evit hoc'h enori staget ouz ar groaz hag o vervel en eun doare me-

zus war ar c'halvar. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ma vo distroet ar bec'he-
stev, ma kendalc'ho an dud just ha ma vo diboaniet anaoun ar purkator.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz staget ouz ar groaz, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

MISTERIOU A C'HLOAR

11

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an unekvet dizenez-mañ, evit hoc'h enori o sevel, leun a c'hloar, eus a varo da veo. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ma vimp karantezus e-kenver Doue ha birvidik en ho servij.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz o sevel eus ar bez, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

12

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an daouzekvet dizenez-mañ, evit hoc'h enori o sevel d'an neñv, leun a c'hloar. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ar youl birvidik da vont d'ar baradoz.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Jezuz o sevel en neñv, diskennit en hon eneou.
Evelse bezet graet.

13

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, an drizekvet dizenez-mañ, evit enori ar Spered-Santel o tiskenn war an ebastel. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre bedenn ho Mamm santel, ma tiskenno ar Spered-Santel en hon eneou.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister ar Pentekost, diskennit, en hon eneou.
Evelse bezet graet.

14

Kinig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar bevarzekvet dizenez-mañ, evit enori ho Mamm santel o sevel eus ar bez leun a vuhez hag o pignat, leun a c'hloar d'an neñvou. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre ho fedenn, eun devoision dener e-keñver eur Vamm ken mat.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Mari o pignat er neñv, diskennit en hon eneou.

Evelse bezet graet.

15

Kinnig a reomp d'eoc'h, Aotrou Jezuz, ar bemzekvet dizenez-mañ, evit enori Mari kurunet a c'hloar er baradoz. Goulenn a reomp diganeoc'h, dre ar mister-mañ ha dre ho fedenn, ma kendalc'himp er c'hras ha ma vimp kurunet er c'hloar.

Evelse bezet graet.

Pater, Ave (10), Gloria.

— Grasou mister Mari kurunet a c'hloar, diskennit en hon eneou.

Evelse bezet graet.

PEDOMP

Me ho salud, Mari, merc'h kanantazus, meurbet d'an Tad, peurbadus, Mamm dudius ar Mab, pried fidel, meurbet ar Speread-Santel, templ enorus an Dreinded Sakr. Me ho salud, Priñsez uhel-dreist hag a zo sujet d'ezhi kement tra a zo en neñv ha war an douar. Me ho salud, repu diriskl ar bec'herien, Itron an drugarez a n'ho peus biskoaz diarbennet den. En em deurel a ran, pec'her bras ma 'z oun e-harz ho treid hag ho pedf a ran da c'houlenn digant ho Mab mat ha karet meurbet, Jezuz, ar c'heuz hag an difez eus va holl fec'hejou, en hevefen amzer gant furnez Doue. En em ouestla a ran d'eoc'h a-bez gant kement tra em eus: Ho kemeret a ran hirio evit va Mamm ha va Rouanez. Grit ouzin eta evel ouz an diweza eus ho pugale hag an doujusa eus ho servijerien. Selaouit, va Rouanez, selaouit huanadennou eur galon hag a c'hoanta ho karet hag ho servija gant lealded. Mirit na vo lavaret ez oun bet

ar c'henta dilazet etouez an holl o deus goulennet ho sikour. O va esperañs, o va buhez, o Mari gwerc'hez fidel ha dinamm, va zifennit, va magit, va selaouit, za zeskit, va salvit.

Evelse bezet graet.

— * * —

KONSEKRASION D'AR WERC'HEZ VARI ROUANEZ AR C'HALONOU

O Mari, c'houi a zo Rouanez en neñv ha war an douar. Mamm oc'h da Zoue ar Mab ha gwir Vamm d'an holl gristenien. Drezoc'h eo e teu d'imp holl grasou an Aotrou Doue.

Evit anaout an holl gwirionezjou frealzus-se e fell ganin hirio en em ouestla a-bez d'eoc'h.

« Ho kemer a ran eta, o Mari, dirak holl lez ar baradoz, evit va Mamm ha va Mestrez. Kinnig a ran d'eoc'h, evel eur sklav, va c'horf ha va ene, va holl madou ha zoken an dalvoudegez eus va oberou-mat tremenet, bezant ha da-zont. Ganeoc'h e lezan pep gwir da ober ouzin hag eus kement tra em eus ar pezh a garot, hep an distera dalc'h, evit o prasa pijadur ha brasa gloar an Aotrou Doue, evit an amzer vremañ ha peurbadelez ar bed all. »

* *

Konsakri a ran d'eoc'h ouspenn ar mision-mañ o tegeri; ar visionerien, o Rouanez an Ebestel, evit ma plijo ganeoc'h rei d'ezo ar c'hras da sklerijenna sperejou ar barrezianiz ha da domma o c'halon evit o distrei ouz an Aotrou Doue.

Kinnig a ran d'eoc'h Pastor mat (pe beleien santel) ar barrez. Roit d'ezan (d'ezo) ar yec'hed a zo ret evit entent ouz an eneoù hag ar c'hras da seveni mat e zeve-riou (o deveriou).

D'eoc'h, o Mamm garantezus, e konsakran ar vugale evit ma chomint bepred dibec'hed ha dre-se ho pugale ka-reta.

An dud yaouank a ginnigan d'eoc'h, o Gwerc'hez di-namm, evit m'o sikourôt da zerc'hel dalc'hmat da gaerder ar yaouankiz, glanded ar c'horf hag an ene.

Digemerit an Tadou hag ar Mammou a familh evit ma resevint diganeoc'h an nerz da ober o dever penn-da-benn kenetrezo hag e-keñver o bugale.

An holl dud koz a gonsakrump d'eoc'h, o Mamm a drugarez. O sikourit da beurgempenn o ene araok mervel e karantez an Aotrou Doue.

O Mamm frealzus an dud doaniet, resevit holl dud klañv ar barrez-man evit ma kavint ennoù h' diboan pe da vihana nerz da c'houzañv mat o holl foaniou.

Pec'herien ar barrez erfin a ginnigomp d'eoc'h, o repu ar bec'herien. Ra vezint skoet holl gant ar c'hras en doare ma vezo, da fin ar mision, holl eneoù ar barrez e karantez an Aotrou Doue, da c'hortoz kemer perz ganeoc'h, Rouanez an neñvou, e levenez dilavar ha peurbadus ar baradoz.

Eivelse bezet graet.



PEDENN DA JEZUZ-KRIST

(DA LAVARET GOUDE AR GOMUNION
EVIT GOUNIT AN INDULJANS LEUN)

O Jezuz mat ha dous meurbet, setu me daoulinet di-razoc'h. Ho pedi hag hoc'h aspedi a ran, gant holl nerz va ene, da deurvezout moula 'em c'halon santimañchou a feiz, a esperañs hag a garantez, eur c'heuz gwirion d'am fec'hejou hag eur volontez start meurbet da drei kein d'ezo, epad ma welan ennoun, dre lagad ar spered, ho pemp gouli hag epad ma sellan a-bann outo, gant eur garan-tez hag eur c'hlac'har bras, o terc'hel dirak va daoula-gad ar c'homzou-se a lavare diwar ho penn ar profet Da-vid hag a lakae dija en ho kenou, o Jezuz mat : « Treu-zet o deus va daouarn ha va zreid. Va holl eskern o deus kontet. »



MOULADURIOU ARVOR

— GWENGAMP —

